

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR-SAKR

gat an Tad BERTHE, Redemptorist,

LAKEAT E DREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSON BANNALEC.

PEVARE LEORIK :

MOIZES



BANNALEC,

23 a viz Here, Gouel hor Redemptor.

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

PEVARE LEORIK :

MOIZES



BANNALEC,

23 a viz Here, Gouel hor Redamptor.

APPROBATION DE MGR LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.

IMPRIMATUR.

CH. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 25 Avril 1892.

Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testament Coz ha Testament Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

† THÉODORE, Évêque de Quimper et de Léon.



MOIZES

I

EUR C'HAVEL VAR STER AN NIL.

GOUDE maro Joseph, bugale Jacob a ioa eat kalz var gresk. Epad daou-c'hant vloaz e vevchont eb anken dindan gouarnamant ar rouanez pharaoned. Lod a laboure an douar ; lod all a zioualle al loened. Sevel a rejont keriadennoù braz ha kaer, a oue evel kaloun an daouzek broiad-tud, pe tribu, a Israel. Var an dachen druz-se a Jessen, pinvidik evel ma z'oant, edont marteze e vont da ankounac'haat ar promesaou great dezho gat ho zadou koz, pa zirollas varnho trubuilhou estlamuz. Digasset oue da zonj dezho neuze, ne doa evitho an Ejipt, daoust d'he finvidigez, nemed eur vro a n'oa ket ho bro guirion.

Ar rouanez ganet e bro an Ejipt, goude beza bet

kannet gat ar rouanez Pharaon, a en hem zavas ouz ar re-ma hag a bignas, adarre var an tron. Ober a rejont raktal brezel d'an Hebreed. N'ho devoa ket anavezet Joseph hag an dud-ma euz he lignez n'oant evitho nemed divroidi digasset e douar Jessen gat ar Pharaoned, laeroun ho zron. Setu perak, pa fellas d'ar roue, goude he viktorioù, sevel dre ar vro kerioù nevez ha palezioù kaer, sevel beziou ha tourioù huel hanvet pyramid hag obelisk, oue lavaret e vije lakeat bugale Israel da ober al labourou pounner-ze. « An divroidi-ze, a lavaras eun deiz ar Roue, a zo leiz ar vro anezho : A benn-nebeud e vezint treac'h d'eomp. Red eo ho diskar hag ho flega dindannomp. Panefe-ze, e c'helfent mont a-du gat hon inimid, beza treac'h d'eomp ha distrei d'ho bro gat an holl danvez o devezo keme-ret divar hor c'houst. »

Setu-hi eta oc'h ober kement a c'hellont evit distruj a nebeudou ar bobl a Israel. Mistri pe gouarnerien a zo kasset da vro Jessen gat urz d'ho la-kaat da ober labourou dreist ho nerz. Great eo dezho sevel diou gear, Pithom ha Ramesses, evit loja tenzorioù ar roue. Darn a rea brikennoù ; darn all a zave mogerioù kear. Lod a zigore kanolioù evit kass dour an Nil a dreuz d'an Ejipt ; lod-all a zave beziou huel spountuz evit loja goude ho maro ar rouanez kriz a ouall-gasse kement anezho epad ho buez. Ho guelet a reat, dindan eun heol bêro, e ruilla peziou-mein, e koueza avechou gat ar skuisder a-ed an hent, pe e vervel dindan taolioù baz ho mistri digaloun.

Hogen, kaer a ioa ober dezho goassa a c'hellet, pobl Israel a iea ato var gresk. Ar roue kounnaret

a roas an urz-ma d'an holl : « Kement map a c'hano d'an Hebreed a vezo beuzet er ster. » Kavet hen doa an tu da zistruj eur bobl e nebeud blavezioù.

Hogen, d'ar mare ma oue douget al lezen dinatur-ze, e veve eun den euz a familh Levi, he hano Amram. Dimezet oa da eur plac'h, euz a familh Levi ive, hag he doa roet dezha daou grouadur : eur verc'hik hanvet Mari hag e devoa eiz vloaz, hag eur map tri bloaz, hanvet Aaron. Eun eil map a c'hanas dezha goude ma oue embannet al lezen nevez. Pa veljont ar c'hrouadurik keaz-se barnet d'ar maro araok m'oa ganet, ker koant, ker koant, e fellas dezho he zavetei kousto pe gousto. Epad tri miz deoc'h-tu e c'hellas ar vam her c'huzet en he zi, daoust d'an enklask great gat ar vuntrerien bugale. Mez guelet a reas er vad ne elje ket mui hen derc'hel dindan guz hag e kemeras eur baner vrou-an.

He gelei a reas gat peg ha roussin evit miret ouz an dour da vont e-barz. Asten a reas ennhi he mabik hag her lakeas er stad-se e-touez ar c'horz, var ribl ar ster.

Mari, c'hoar vihan ar c'hrouadur, a ioa var evez evit 'guelet petra' vije deuet da veza ar c'havel. Setu ma vel merc'h ar Roue Pharaon e tiskene ed ar ster. Houma, pa vélas ar baner e touez ar c'horz a gassas unan euz he flac'hed d'he c'herc'het ha d'he digass dezhi. Ar c'hrouadur, dioc'h-tu, en hem lakeas da glemm ha da ouela

« Eun Hebreed eo, a lavar ar brinsez leun a drez e outha. »

Epad m'edo e tivis gat ar merc'hed a ioa oc'h he

heul ha ma lavare dezho peger koant her c'have, e teuas Mari d'he c'haout, evel eb gouzoud petra'ioa eno.

« Mar kirit, va Itron, emezhi, me'ielo da glask d'eoc'h eur c'hreg Hebreadd evit maga ar c'hrouadur. »

« Kit, va merc'h a respount ar brinsez. »

Mari a ieas d'ar-red da glask he mam.

« Kemerit ar c'hrouadur-ma, a lavar dezhi merc'h ar roue, ha roit dezha euz ho leaz ; me va unan eo a roi d'eoc'h ho pae. »

Jocabed a gemeras he map a-dre divrec'h ar brinsez hag her savas ken na oa deuet krennbaothr. Neuze e teskas dezha petra oa Doue he dadou koz, petra dlhe he bopl beza divezatoc'h ha pegen truezus oa he zoare brema en Ejipt. Goudeze e kassas anezha da verc'h Pharaon. Houma a gemeras, anezha evit he map hag a roas dezha evit hano : *Moizes*, ar pezh a ziniñ : saveteet euz an dour.

E palez Pharaon, Moizes a resevas ar memez deskadurez evel ar brinsed iaouank ha bugale ar re vraz euz ar vro. Studia' reas an holl skiantchou a vije desket d'ar poent-se en Ejipt ha deski a reas ive penaoz gouarn eur bopl. Gant ar spered lemm en devoa, e teuas e nebeud amzer da veza eur goaz kren en oberou ha fur en he gomzou. Mez ne glaske ket enoriou ar palez. He ene a ioa gat Doue ha gat he vreudeur. Mall hen doa da veza e touez ar re-ma ; ha d'an oad a zaou-ugent vloaz, e tistroas da vro Jessen, da labourat evit silvidigez he bopl.

An traou n'oant eat nemed var voassaat. Bepred labouriou-tenn, taoliou ha sklavaj. Eun devez, epad m'edo e kompren penaoz dilivra ar bopl, e

velas unan euz he genvroiz etre daouarn eun Ejiptian hag hema a skoe varnha evel eun den dall. Moizes a ia drouk ennha ha, goude beza great eur zell tro-var-dro evit gouzoud a n'oa test ebed eno, e saill gat an Ejiptian hag he c'hastennas anezha maro-mik e c'hars he dreid. Goudeze, evit miret nep enklask e reas eun toull en treaz hag e kuzas ennha ar c'horv maro.

An taol hardiz-se a dlhe beza desket d'he genvroiz pegement a garantez hen devoa evitho. N'ho doue anaoudegez-vad ebed dezha : Rak Israël a ioa morgousket er sklavaj. Antronoz, daou Israelit a ioa savet trouz etrezo. Setu Moizes evont d'ho departia :

« Petra'eo d'eoc'h, emezha d'ar ouassa anezho, skei evelse gat ho preur ? »

« A c'hui, a respount dezha an den-ze, petra eo d'eoc'h dont ama dirazomp-ni evel hor mestr hag hor barnier ? A c'hoant ho c'heuz-hu da laza ive ac'hanomp evel m'ho poa lazet deac'h an Ejiptian ? »

Moizes a jommas mantret ha ne ouie petra da zonzal. Penaoz oa bet anavezet an taol hen devoa great ? Ar brud a ieas buhan bete Pharaon hag hema, drouk ennha, a roas urz d'he zoudarded da baka Moizes ha d'her lakaat d'amaro. Mez Moizes ne zaleas ket mui er vro-ze. Kimmiada' reas dioc'h he dud ; treuzi a reas ster an Nil evit mont en desert, e bro Madian.



II.

PASTOR MADIAN.

Ra ias er meaz euz an Ejipt, Moizes a zio-uezas en eur vro tenval ha gouez, dishen-vel braz dioc'h traññien pinvidik an Nil. Dirazha edo ar gouelec'h gat eur mor a dreaz, eun dachennik glaz bep an amzer, menezier du ha skeud ar maro. Diskenn a ra etrezek ar c'hrestez, he lagad bepred var gern menez Horeb, hag erruout a ra e bro Madian var-dro kuz heol. Skuiz-maro e vale dre an entchou meinek-se, e c'hazezas e kichen eur puns evit terri he zec'hed hag ober eun ehan.

Eur moment goudeze, seiz merc'h iaouank Jethro, belek Madian, a ziskennas eno ive evit rei dour d'ho loened. Edont zo-ken e punsa dour hag e karga ar c'haniou evit ho denved pa erruas pastored all hag a glaskas kass ar merc'hed kuit ha kemeret ho flass. Moizes a ias drouk ennha, a zavas a du gat ar merc'hed iaouank hag a zikouras anezho zo-ken da rei da eva d'al loened, en henvelep fessoun ma c'herruas ar re-ma er gear araok an heur m'oant kustumet.

« Petra'e d'eoc'h, a lavar Jethro, ma zoc'h distro d'ar gear ken abred-ma ? »

Ar merc'hed iaouank a gountas dezha neuze istor an Ejiptian. Azezet oa e kichen ar puns, diarbenn en doa great ar bastored a glaskte trabas outho hag ho zikouret da rei dour d'al loened.

« E pe leac'h emañ an tremeniad-se, a lavar ar belek koz ? Perak ho c'heuz-hu her lezet da vont kuit eb kinnig dezha lojeiz ? It affo d'her pedi, m'ar kavit anezha, da zont da breja ganeomp fe-noz. »

Jethro, Belek ha prins ar vro-ze a ziskennas euz a lignez Abraham. Rak he dad koz Madian a ioa map da Abraham ha da Zetura. Digemer a ra Moizes evel eur mad oberour ha prestik e maint evel daou vreur. Ho daou int euz ar memez ouenn ; ho daou e servichont ar memez Doue, an Hini en deuz great a netra an Env hag an douar ; ho daou e tisprijont doueou faoz an Ejipt. Evit gounid he niz e roas dezha da bried unan euz he verc'hed, he hano Sephora. Moizes en devoue daou vap digathi. Ar c'henta a hanvas Gersam, da lavaret eo perc'hirin, evit digass da zonz oa bet tremeniad en eur vro estranjour. An eil a oue hanvet *Eliezer*, mignoun Doue, abalamour emezha, Doue hen deuz va zennet a dre daouarn Pharaon. Moizes deuet da veza euz a famill Jethro a iea bemdez gat ar bastored all da ziuall loened he dad-kaer.

Daou-ugent vloaz a ioa m'edo e troïdellat dre ar gouelec'h, e bro Madian, pa deuas ar maro da skei roue an Ejipt. Mez ar bobl a Israel n'hen devoa netra' vad da c'hortoz digat an hini a vije lakeat en he blass. Klemm hag hirvoudi a reont eta ha pedi Doue da zellet a druez outho. Doue a velas ho daëlou hag e teuas da zonz dezha euz an alians hen doa great gat Abraham, Isaac ha Jacob.

Eun deiz, Moizes hen devoa kasset he dorrard denved pell er gouelec'h, e c'harz Menez Horeb. Eno, e velas, en eun taol - kount, eun tan flamm e sevel euz a greiz eur vojen; hag ar vojen a ioa tan ennhu ha ne beurzeve ket. Chomm a reas pell-amzer mantret dirak ar burzud-se. Felloud a reas dezha her gulet a-dost. Dija edo e kichen pa glevas eur vouez e lavaret dezha euz a greiz ar vojen :

« Moizes ! Moizes ! »

— Setu-me ama, emezha en eur grena.

— Na rit ket eur paz muioc'h ; mez tennit ho poutou : Rak an douar a zo dindan-hoc'h a zo eun douar santel, dre ma zemaoun ama, me, ho Toue ha Doue Abraham, Isaac ha Jacob.

Moizes a jommas a za. Tenna' reas he voutou ha kuzet a reas he vizaj dindan he vantel; rak ne grede ket sellet a-fass ouz an Doue a gomze outha.

« Gulet em euz, a lavar neuze an Aotrou Doue, pegen ankeniet eo va fopl. Hirvoudi ara ha klemm dre ma z'eo goal gasset gat ar vistri euz an Ejipt. He vouez a zo savet betek ennhon ha va c'halon a zo gounezet. E maoun e vont d'he denna a boan ha d'he gass euz an douar-ze asklavaj da eur vro ledan ha pinvidik, el leac'h ma red al leaz hag ar mel. C'hui, Moizes, eo a fell d'in da gass bete Pharaon evit dilivra bugale Israel euz a sklavaj an Ejipt. »

Moizes, o sonjal neuze pegen douget eo an dud-se da ziskredi, a lavar da Zoue : « Piou oun-me evit mont da gaout ar roue Pharaon, ha tenna bugale Israël euz an Ejipt? »

Doue a respountas dezha : « Me a vezo ganeoc'h. — Ha ma c'houlén an dud-se diganen piou

hen deuz va digasset, pe hano a vez great anezha, petra' livirin-me? »

Doue a lavaras dezha gat eur vouez sklear ha var he bouez : « Me eo an Hini a zo, (dreizha he unan). Lavarit d'ar bobl c'hoaz : « An Hini a zo eo en deuz va digasset betek ennoc'h. Doue ho tud koz eo ; Doue Abraham, Isaac ha Jacob. He hano a bep amzer a zo bet Jehovah hag an hano-ze a rooc'h dezha iviziken euz an eil rum d'egile. Kemennit d'ar re gossa dont d'ho kaout ha deskit dezho e zeint a benn nebeud amzer da vro Kanaan. Mont a reint assamez ganeoc'h bete roue an Ejipt hag e lavaroc'h dezha : « Doue an Hebreed a ro urz d'eomp da vont d'ar gouelec'h, tri derveziad bale ac'halenn da ginnik dezha eur Sakrifis. » Me a c'hoar ne lezo ket Pharaon ac'hanoc'h da vont kuit nemed pa vezo red dezha. Hogen, me a astenno var an Ejipt va breac'h holl-gallouduz ha skei a rin var oc'h inimied taoliou ker pounner ma lezint ac'hanoc'h da dec'het ha ma roint d'eoc'h zo-ken vessel ha dillad a-briz evit ho sikour da ober ho peaj. Ha setu e vezoc'h libr hag e ze i ous penn ganeoc'h kalz pinvidigez euz an Ejipt. »

— Ha ma tiouez dezo evel-se, eme Moizes, lavaret d'in ne ket red dezho kredi va c'homzou-me ha n'eo ket anad e teuffen a-berz Doue, petra' rinn-me? »

« Petra'zo ganeoc'h en ho tourn, a lavar dioc'h-tu an Aotrou Doue? »

— Va guialen a bastor.

— Taolit-hi d'an douar. »

Ar vialen taolet d'an douar a droaz dioc'h-tu en eun aër. Moizes en deuz aoun.

« Astennit ho tourn, eme ar vouez, ha pegit e lost an aër. »

An aër raktal a deu guialen adarre. « Dioc'h ar merk-se, a lavar c'hoaz an Aotrou, bugale Israel a anavezao eo en hem ziskuezet d'eoc'h Doue ho tud koz, Abraham, Isaac ha Jacob. Ma n'e ket aoualac'h kement-se evitho, setu ama eur burzud-all. Lakit ho tourn var ho pruched. »

Moizes a zentas, ha kerkent he zourn a oue go-loet a lorgnez guenn-kann evel an erc'h.

« Lakit adarre ho tourn var ho pruched. »

Dioc'h-tu an dourn a zo pare ha ker iac'h ha biskoaz.

« Ma chommont c'hoaz gourd da gredi goude an daou vurzud-se, c'hui a gemero dour euz ar ster : c'hui a fuillo an dour-ze var an douar hag e vezo troet e goad. »

Gouskoude, Moizes ne vele ket eb spount ar beac'h pounner a zamme dezha an Aotrou Doue var he ziskoaz hag a lavare :

« Va Doue, sonjit er-vad, emezha, me n'oun ket helavar hag abaoue ma komzit ama ouz ho servicher e kavan e zoun c'hoas muoc'h bestead eget araok.

— Piou en deus great teod an den, a respount an Aotrou ? Kerzit eta eb aoun. Ouspenn, ho preur Aaron a zo erru d'ho sikour. Me a lakai komzou var ho muzellou hag ho pleino en oc'h oberiou. C'hui' lavaro da Aaron bolontez Doue hag Aaron a gomzo evidoc'h dirak ar bobl. Dalc'hit mad d'ar vialen-ze. Gat honnez c'hui a rei burzudou. Brema kerzit eb aoun etrezek an Ejipt ; rak ar re a glasse ho lakaat d'ar maro, a zo diskennet ho unan er bez. »


Goude an diviz-se etre Doue hag hen, Moizes a zistroas da di Jethro, he dad kaer.

« Red eo d'in, emezha, distrei d'an Ejipt da velet a va breudeur a zo beo c'hoas. »

« Va map, ra vezo Doue ganeoc'h, a respountas ar belek koz ! »

Moizes eta a guiteas bro Madian, goude beza bevet ennhi daou-ugent vloaz, didrouz ha dianavezet. En dezert e kavas he vreur Aaron, hervez m'en devoa Doue lavaret dezha. Goude beza her brieteat gat teneridigez, e kountas dezha petra'ioa bet c'hoarvezet gatha var menez Horeb, petra hen devoa lavaret dezha an Aotrou hag ar burzudou a dlient da ober.

Pa zint erruet en Ejipt, e tastumont en dro dezho ar re goz e touez bugale Israel ha goude beza diskleriet dezho ar pezh a felle da Zoue a vije great, Moizes a reas dirak ar bobl a-bez ar burzudou red evit diskuez e teue euz a berz Doue. Ar bobl a gredas hag a ieas d'an daoulin evit trugarekaat Jehovah da veza great eur zell a druez ouz he bobl ha da veza savet evit terri ho jadennou.





III.

GOALINIER DOUE VAR AN EJIPT.

DUN deiz, ar roue didruez a c'houarne an Ejipt, a velas deuet d'he balez, e Tanis, daou gannad euz a-berz ar sklaved reuzeudik, bourrevet e bro Jessen. Moizes oa hag Aaron, a deue da c'houlenn digatha, en hano Doue an Hebreed, konje d'ar bobl da vont d'an dezert da ginnik eur sakrifiks.

« Doue an Hebreed, a lavar Pharaon e kounnar! Petra eo an Doue-ze evit rei urziou d'in-me? N'hen anavezan ket ! ha mallik konje n'ho pezo da vont d'ar gouelec'h. »

Kaer o devoue ar gannaded lavaret d'ar Roue ne deant di nemed evit ober eur sakrifiks d'ho Doue ha pellaat dioutho evel-se ar vossen hag ar brezel, ar Roue a jommas bouzar.

« Paouezit, a lavar-hen da Voizes ha da Aaron, paouezit da zistrei an dud-se divar ho labour; ha c'hui ive kit d'ho labour ! »

Pa oue e unan gat ar vistri a ioa karget da deuler evez var al labouriou publik e roas dezho urziou striz. « An dud-se, emezha, a gresk evel raden ha ma ne ziuallomp ket e zeint goassoc'h-goaz. Be-

tek-hen, oc'heuz roet dezho kement a vije red a golo evit ober brikennou. Iviziken, e rankint klask ho flouz ho unan, ha rei bemdez gouskoude ar memez niver a vrikennou. Pa no devezo ket an dud-se a ehan, ne deuint ket da derri hor penn d'eomp defot mont d'ar gouelec'h ha ne zelaouint ket ravedrez Moizes hag Aaron. »

Ar vistri a reas hervez ma oa merket dezho gat Pharaon. Setu ma renkas eul loden euz ar vicherourien mont da glask plouz a dreuz d'an Ejipt hag ar re a jomme var al labour a c'houlennet digatho bemdez kement a vrikennou ha diaraok. Evel ma zoa dreist galloud peb den ober eun henvelep labour, e tirolle varnho tud kriz, ar skourje pe ar vaz en ho dourn, hag a skoe varnho didruez. Ar re euz a vugale Israel a ioa e penn al labourou a reas ho c'hlemm d'ar roue Pharaon :

« Perak, emint-hi, goal-gass ho servichourien evel a rit ? Hor bazata'rear, ni ho servichourien, abalamour n'or beuz ket great ar pezh n'ema ket e galloud an den ober. N'oc'h ket just en andret ho pobl. »

Nemed re a amzer oc'heuz, a lavar ar roue gat eur c'hoarz iudaz ; setu perak emaoc'h e klask mont da vale dre ar gouelec'h en honor d'ho Toue. Kit d'ho labour ; rak me ne chenchin netra el lezen a meuz douget. »

Moizes a glemmas oc'h Doue, ha Doue a roas urz dezha da vont da gaout Pharaon evit ar memez kevridi. A veac'h en devoa lavaret ar pezh a c'houlenne Jehovah, ma c'houlennas ive ar roue digatha ober eur burzud bennak evit diskuez sklear oa karnad Doue. Var urz Moizes, Aaron a astennas he

zourn a-zioud ar ster *Nil* ha kanoliou all an Ejipt, ha kerkent kement berad-dour a ioa, a oue troet e goad hag er goad-se e varvaz holl besked an Nil. En desped da gement-se, Pharaon a jomme aheurtet en he zantimant. Neuze Aaron a astennas adarre he zourn a zioud an dour, hag e teuaz ac'hano kement a villierou raned ha guensklivi ma kavet anezho e peb ti, e peb leac'h, bete zo-ken e kamp ar an Aotrou Pharaon.

Pharaon, koeuzet he veudik en he zourn, a lavaras da Voizes : « Pellaït diouzomp an drouk-ma ha me ho lezo da vont el leac'h ma plijo d'eoc'h. »

« Me, a lavar dezha Moises, a bedo va Doue, ha guelel a reoc'h n'e deo Doueou an douar nemed eun netra dirazha. »

Eur vech m'oa tremenet ar boan, Pharaon a reas fea var he bromessa. Neuze, Moises a skoaz gat he vialen var ar bouldren pe uzien euz an hent hag ar bouldren-ze a oue chenched en eun torrad spountuz a c'huibu, a stage oc'h an dud hag al loened, kement ha kement ma lavare ar Vajisianed ho unan : « *Dourn Doue a zo ama.* » Var lerc'h ar c'huibu-ze e tiouezas eun arme a gellien lor hag ampezounet. Setu Pharaon o c'houlouen grass eur vech c'hoaz.

« Kit, emezha, da ginnig sakrifiks d'ho Toue, mez var douar Jessen. »

« Nann ! nann ! a lavaras Moises : mez ober a raimp tri derveziad bale en dezert araok kinnig hor sakrifiks da Jehovah ! »

« Evel-se bezet great ! a lavar ar Roue ; mez pedid Doue evidon. »

Eur vech er meaz a zanjer, ar roue, na petra'ta,

a oue mall gantha mankout d'he bromessa. Hogen Doue drouk-kountant a gassaz eur c'hlenved spountuz var holl loened an Ejipt. An dud zo-ken a oue kalz anezho goloet a c'horiou, a c'houlou ; ar gurun a grozas en eur fessoun estlæmuz ; al luied a lugerne euz an eil-tu d'egile ; hag ar c'hazerc'h en eur goeza evel glao ha braz evel uiou brini a flas-tras kement a ioa glaz var an douar. Ne jomm var-lerc'h nemed skeud ar maro.

« Pec'het am euz, a lavar neuze Pharaon nec'het-mar ; Doue a zo just. Pedit ho Toue da gaout truez ouzin ha me ho lezo da vont kuit. »

Bern gevier ! Mez piou a c'hell skuiza an Aotrou Doue ? Antronoz, eur bar amzer spountuz a zigassas euz an dezert torrajou killeien raden hag a zreas kement tam glazder a ioa chommet a zierc'h an arne, an tammou frouez, an nebeud iead. Pharaon kaledet a zalc'he mad. Neuze e kouezas var traonien an Nil eun denvalijen ken teo ma chomjot e doug tri dervez eb finval hag eb en hem velet.

Daoust d'an taoliou pounner en devoa skoet an Aotrou Doue, daoust ma zoa ar bopl-holl spountet, Pharaon a zalc'he c'hoaz a enep Doue. Kaledet oa ha dallet. Brema-zouden e vezo diskaret.





IV.

KENAVO.

An taoliou pounner en doa skoet Doue var an Ejipt a lakeas ar Roue ourgouilluz Pharaon da skanbenni. Pa oue tremenet an tri derveziad tenvalijen, e zeas en egar : « Teac'h diouzin, a lavar-hen da Voizes. Mar teuez biken mui dirazon, e zoud maro. » Roue braz, a respountas an den mad, sentet e vezo ouzoc'h. Biken mui ne veloc'h va zeuliou en ho palez. » Neuze Moizes a ieas kuit. Da benn eun nebeud amzer, pa edo e vont da skei an taol diveza var an Ejipt, Doue a lavaras dezha ar pez a dlie diskleria d'ar bopl a Israël.

« D'an dekved dervez euz ar miz-ma, (hag hema a vezo iviziken ar c'henta euz ar bloaz) e tispartioc'h e peb famill eun oan-bloaz. D'ar pevarzekved dervez c'hui her lazo dioc'h an abardaez. Gat goad an oan-ze c'hui a livo postou ha gourinou peb dor hag en noz da c'houde c'hui a zrebo ar c'hik gat bara poazet eb gouell ha letuz gouez. Ar pred-se a reoch d'ar red, en ho sa, ar c'houriz en-dro d'eoc'h, ho poutou en ho treid hag ho paz en ho tourn, da c'hortoz ar Pask, da lavaret eo, da c'hortoz ma tremeno an Aotrou. Me, Jehovah, eo a dremeno d'an

anter-noz a dreuz an Ejipt ha lakaat a rin d'ar maro holl mipien hena an dud ha, zo-ken, ar c'hossa euz re vihan al loened. Guelet e vezo neuze petra'dal Doue an Ejipsianed. Neuze euz a gement roud avel a zo, e vezo klevet dre an holl Ejipt klemmou hag hirvoud evel n'euz bet morse savet bete skouarn an den. Mez, evit tiez Israel, livet gat goad an oan, me a dremeno en ho c'hichen ; hogen n'ho devezo ket an disterra drouk.

« An deiz braz-se a vezo evidoc'h deiz ar vignouniaj evit biken ha bez'e vezo evidoc'h eun dervez gouel euz an eil rum d'egile. Bep tro ma tiouezo an deiz-ha-bloaz, e lazoc'h oan ar Pask, ha pa c'houlenno diganeoc'h ho pugale : « Perak ar gouel-ze ? » c'hui a respounto : « Ar gouel-ma a zo e memor euz an oan or boa lazet guechall pa dremenaz Jehovah dre hon touez evit dilivra he bopl. »

Great oue piz-ha-piz hervez m'oa bet gourc'hennet gat Moizes. Setu d'ar pevarzekved dervez euz ar miz, da boent ar pred misteriu, Doue a skoas holl mipien hena an Ejipsianed adalek heritour Pharaon en he balez betek map an disterra euz ar sklaved, en he brizoun. Var ar meaz koulz hag e kear, an holl, roue, prinsed, tud ar palez, sujidi, a zavas e-kreiz an denvalijen, spountet-holl hag e savaz eur c'hri-forz, a bep tu. E peb ti e zoa eur c'horv maro.

Ar roue a gemer aoun hag a gemenn da Voizes dont d'he gaout. « Kit kuit euz a douez va vopl, emezha gat eur vouez glac'haret, c'hui hag holl bugale Israël. Kit da ginnik eur sakrifs d'ho Toue hervez mo c'heuz goulennet. Kassit ganeoc'h ho tenved hag oc'h holl loened, ha ne vankit ket da

bedi evidon. « Ia, ia ; kit kuit, a lavare ar bopl var-lerc'h ar Roue ; astit mont ac'han pe e varvimp holl. »

Euz a Ramessez eo e tiblassas an Israelited. C'huec'h-kant mil den oant en oad da zougen an armou, hag ho holl aneveled a iea gatho.

Setu penaoz oue dilivret ar bopl a Israël hervez ar bromessa great gat Doue da Abraham, pevar-c'hant vloaz a ioa. En eur guitaat ar vro-ze a boan, bugale ar patriarch ne ankounac'hejont ket komzou diveza Joseph : « Pa deui Doue d'ho pizita kassit ganeoc'h va eskern evit ho zebelia en douar promettet da Abraham, Isaac ha Jacob. » Dastum a rejont gat resped relegou an hini a ioa hanvet gat ho zud koz *Salver ar vro* ha gat an tenzor pre-siuz-se e zeont e penn an hent etrezek ho bro.

Moizes a ioa er penn araok ha var he lerc'h e teue ouспен tri milioun a dud. E *Socoth*, oue an ehan kenta. Eno Moizes a ellas ober lodennou euz an dud ha diskleria dezho ar pez a ioa red evit derc'hel an urz-vad. Goudeze e chomjont adarre a-za en Etham, var bord gouelec'h an Arabii. Eno, an Doue mad hen devoa ho zennet euz an Ejipt a roas dezho c'hoas eur merk euz he garantez. Evit ho zikour e douk ho beaj, e c'haparissas dirazho dindan furm eur goumoullen vraz hag ar goumoullen-ze a ioa sounn en ear evel eun tour. Epad an noz, e taole eur sklerijen vraz evit diskuez dezho an hent hag e kreiz an deiz deuet taval ho dioualle a eneb an heol bero. Bugale Israël a ieas adarre en hent, laouen-braz, da heul an hencher misteriu-ze.

Mez, setu pa edont e vont etrezek ar sao-heol, varzu an douar promettet, Doue a roas urz dezho

da zont var ho c'hiz : « It, emezha da Voizes, da gampi dirak Philahiroth, etre ar mor hag ar menez, etre Magdalum ha Beelsephon. Pa velo ar roue kaledet, Pharaon, e zoc'h prizouniet en toul-ze e fello dezha ho poursu. Neuze Me a ziskuezo d'he holl armeou peger pounner eo va breac'h ha dan holl Ejipt e tiskuezin ive eo me ar mestr. »

Moizes a roas eta urz d'an Israelited da vont da gampi e kichen Philahiroth. Dirazho, e tu ar sao-heol, edo ar mor ruz ; e tu ar c'huz-heol, ar menez, etre hi hag an dezert, hag adren, evit miret outho da zistrei var ho c'hiz, ema an Ejiptianed e kounnar. Rak Pharaon hag he dud a ioa savet keuz gatho : « Pegen diskiant omp-ni bet, emezho, e lezer da dec'het ar re a ioa e sklavaj ganeomp? » Setu perak ar Roue a gemennas d'he holl zoudarded dont d'ar brezel. Pignat a reas he unan var he gar ha c'hoec'h kant kar a vrezel a deue d'he heul. Imor o devoa e vont da boursu bugale Israel. Pa erruas Pharaon gat he holl arme e *Philahiroth* e velas an Israelited kampet var ribl ar mor, en eun dachen striz, en henvelep fessoun ma tlient beza holl draillet eno. Ar Roue a ioa laouen. Sonjal a rea e zoa dija gounezet ar viktore. Hogen an den ourgouilluz-se ne c'houie ket c'hoaz galloud Jéhovah.

An Israelited a ioa, koulz lavaret, ken dall hag hen. Rak kercent a ma veljont var ho lerc'h arme vraz Pharaon, spourounet-holl, en hem lakejont da grial a eneb Doue ha Moizes : « Ha n'oa ket, emezo, aoualac'h a blass d'hor sebelia en Ejipt, m'ho peuz falvezet hon digass ama, en dezert-ma? Pa deuac'h da lavaret d'omp kuitaat an Ejipt, a ne ket mad a reamp respount d'eoec'h : « Lezit ac'ha-

nomp da zervicha hor mistri : rak guelloc'h eo ganeomp servicha ama hor mistri eget mont da vervel en dezert ! »

« Beziteb aoun, a respountas dezho Moizes. Hirio memez, Doue a dle ober evidoc'h eur mirakl euz he holl-c'halloud. An armeou-ze euz an Ejipt a velit gat kement a spount, da benn eun nebeudik amzer, n'ho guelloc'h-mui ; e vezint eat da netra. »

Kerkent, eal ar goabren a vleine Israel a deuas var he giz hag en hem lakeas etre an Ejipsianed hag an Israelited. An Israelited a reseve eur sklerijen dispar epad m'edo an Ejipsianed en eun denvalijen ken du ma ne ellent na guelet na kerzet. Etretant Moizes a astenne he zourn a-zioud ar mor ; ha Doue a zigoras ar mor dre greiz. Digass a reas eur fourraden avel hag a zizec'has, en eun nozvez, al lec'hid ; hag ar bobl a Israël a ellas treizia eb glebia zo-ken ho zreid etre diou vogeriad dour. Armeou Pharaon a zailh var ho lerc'h, soudarded var droad, soudarded var varc'h, kirri a vrezel. Hogen Jehovah, a dreuz ar goabren, a gass beteg enno eun taol lagad hag a zo evel eun tarz-kurun ; ar c'hezek a spount, ar c'hirri a zo troc'holliet, hag ar zoudarded a zo gatho a zo taolet e strad ar mor. « Tec'homp, tec'homp, emint-hi, tec'homp diouz Israel ; rak Doue a zo evitho. » Mez Jehovah a roas urz adarre da Voizes da asten he zourn a-zioud an dour ha raktal an diou vogeriad dour a guezas var an Ejipsianed hag ho lounkas holl eb lezer unan ebken en ho dilerc'h.

Pa velas an Israelited ho enebourien diskaret, pa veljont kement a gorrvou maro taolet var an aod e chomjont mantret ha sebezet, e sonjal peger braz

eo galloud an Aotrou Doue. Da benn eun nebeudik gouskoude, e sao en ho c'haloun joa ha levenez ; ha Moizes kenteliet gat Doue a ganas ar c'hantik kaer-ma, a oue kanet gat ar bobl var he lerc'h :

« Kanomp eur c'hantik d'an Doue a zo e paouez diskuez d'eomp he c'hloar hag he c'halloud en eur deuler e strad ar mor ar marc'h hag an den a ioa varnha.

« Gloar da Jehovah, va nerz ha va zilvidigez. Jehovah eo va Doue ; renta'rin dezha meuleudi. Doue va zud koz eo, hag e fell d'in lavaret peger braz eo he c'halloud.

« Jehovah eo ar zoudard dispar. He hano eo *Holl-Galloudek*. Tumpet en deus er mor kirri ha soudarded Pharaon ; ar re vella euz he gapitened, stlapet evel eur mean en dour, a zo eno astennet ep buez.

« Ho preac'h, o Jehovah, en eur rei lamm d'hon enebourien, en deus diskuezet dezho peger braz eo ho kalloud. Ho preac'h, Aotrou, en deus skoet kalet varnho. Gat ar sked euz ho kloar o c'heus pilet ho c'henebourien. Pa zeus eat drouk ennoc'h, o c'heus ho rostet evel eur goloen. Gat eur c'hoezaden o c'heus berniet an dour, hag an dour a rede a zo chommet a-za evel eur voger hag hen deus digoret hent dre greiz ar mor doun. Ni a ielo d'ho heul, a lavare an enebourien ; ni ho fako, a ranno entrezomp ho finvidigez hag hon ene a vezo leun a joa. Dispaka'reimp hor c'hleze hag hon dourn ho lazo beteg an diveza. Hogen, c'hui o c'heus great eur c'hoezaden ebken hag ar mor en deus ho goloet. Koezet int evel eun tam ploum e goeled an dour braz.

Piou'zo krenv eveldoc'h, Aotrou, e touez ar re

grenva, Doue Santel, Doue terrupl ha din da veza-meulet, Doue ag a ra kement a vurzudou, ag a gass da guzet e kaloun an douar an enebourien ar re galloudussa.

« C'hui a vleino, o Doue a drugarez, ar bobl o c'heus saveteat euz ar maro. Ho tourn galloudiz ho c'hasso betek ar vro zantel. Ar Philistinet a grio gat ar spout; Prinsed Edom a greno; ar Moabited, tud a vrezel a sklasso gat an aoun; tud Kanaan a zizec'ho gat an enkreiz. Neuze, e kassoc'h Israel var ar menez Santel, el leac'h merket ganeoc'h evit sevel ho templ. Bevet Jehovah da viken! »

Ar goazed gat Moizes hag ar merc'hed gat Mari, he c'hoar, a gane an diskan oc'h son an taboulinou, ken na dregerne gatho an dezert.

« Kanomp eur c'hantik d'an Doue a zo e paouez diskuez d'eomp he c'hloar hag he c'halloud en eur deuler e strad ar mor ar marc'h hag an den a ioa varnha. »



V

MENEZ SINAÏ.

DOUDE beza treuzet ar mor ruz, tennet a nec'hamant var bouez an Ejipsianed, an Israelited a ias doun e gouelec'h Sur. Eno e tlient kaout kalz trubuilh. Epad tri dervez o doa kerzet dre an dezert-se eb eur banne dour. Kenta guech ma kampchont e kavchont eun eien-nen. Hogen; an dour anezhi a ioa ker c'huero ma ne ellent ket he eva. Al leac'h-ma, emezo, a vezo hanvet *Mara*, da lavaret eo c'huero; ha setu hi da c'hrosmolat ha d'en hem glem euz Moizes. Doue a roas neuze urz da Voizes da deuler en dour eur seurt koat ag her lakeas mad dioc'h-tu. Prestik e savchont ho zeltou e kichen daouzek feunteun, e skeud an daouzek ha tri-ugent guezenn palmez a Elim.

Miz goude m'oant deuet er meaz euz an Ejipt, e tiouessont e gouelec'h pe dezert *Sin*, etre *Elim* hag ar *Sinaï*. Eno, e savas keuz gatho d'ar c'hik delikat ha d'ar bara mad a gavent eb poan, en Ejipt. « Hon digasset o c'heus eta er gouelec'h-ma da vervel gat an naoun, a lavarent-hi da Voizes? » — « Ne ket ouzin-me, mez ouz Doue eo e c'hen hem zavrit, a respount Moizes: Mez gouzoud a reoc'h varc'hoas en deus galloud aoualac'h evit rei d'eoc'h kig ha bara leiz ho kov. »

Setu vardro an abardaez millierou a c'hoailled e

koeza var kamp an Israelited hag antronoz vintin an douar a ioa goloet a c'hreunennou bihan, guenn kann evel an erc'h.

Ar c'hoailh eo al lapous a glevomp avechou en hor bro e kana : pemp guennek, pemp guennek.

« *Manu?* Petra eo an dra-ma, a leverjont sebezet-holl? — Hennez, a lavar Moïzes, eo ar bara a zigass d'eoc'h an Aotrou. Bep mintin, e tastumoc'h ar pezh a vezo red evit peb den hag an anter-muioc'h, d'ar guener, d'an deiz araok ar sabbat. »

Ar boued-se, evit ar vlaz a ioa henvel ouz eur goastel great gat bleud ha mel. Hanvet oue *Mann* abalamour d'ar gomz *Manhu* a lavaras ar bopl pa velas evit ar vech kenta ar bara-ze digasset e prezant dezha gat Doue beteg an deiz ma vezo erruet en douar prometet.

Euz a zezert Sin, an Israelited a deuas da gampi da Raphidim. Eno n'oa ket eur berad dour. Sevel a ra adarre klemmou ha grozmol a-zoare. Moïzes en hem erbedas ouz Doue, ha Doue a lavaras dezha : « Skoit gat ho kuialen var mean *Horeb* hag euz ar roc'h e tarzo dour aoualac'h evit terri ho zec'hed d'an holl. » Moïzes a zentas hag ar bobl a evas laouen euz an dour mirakuluz-se. Al leac'h-se a oue hanvet *tentasion*, abalamour ma o devoa diskredet euz galloud an Aotrou Doue.

Etretant, ar boblou divar-dro n'oant ket eb enkreiz o velet an arme-ze kampet en dezert. Ar re a ioa brassa danger evitho oa an Amalesited : rak ar re-ze oa ar re dosta. Ar re-ze ive eo a zavas da genta da ober brezel da vugale Israël. Moïses a lavar da Josue : « Kemerit ganeoc'h ar re vella euz hon tud a vrezel ha kit a enep Amalek. Evidon-me, me

a bigno var ar menez, guialen Doue em dourn. »

Epad m'en hem gannet a zevri en draonien, keit a ma vije gat Moïzes he zivrec'h savet etrezek an Env, Israel en doa ar gounid : Mez pa zioueze dezha ho lezer da goeza, Amalek a veze treac'h. Hur hag Aaron, pignet var ar menez gat Moïzes, a renkas harpa dezha he zivrec'h bete kuz-heol, ken na de-c'has an Amalesited kannet gat Josue. Doue a ioa drouk-kountant euz ar brezel-ze savet gat Amalek a eneb he bobl hag a douas distruj ar ouenn-dud fall-ze ha, zo-ken, ho hano.

N'oa nemed daou viz abaoe m'oa bet tennet Israel euz an Ejipt, ha dija Doue en doa great dirazha kalz traou burzuduz. D'an trede deiz euz an trede miz, ar belerined a velas dirazho menez Sinai, jeant ar gouelec'h, a zao he benn karget a reier eiz mil droatad a-uz d'ar mor. Eno e tlie Jehovah dispaka dirazho he c'halloud hag he vajeste.

Pa oue savet an teltou dirak ar menez, Doue a gomzas ouz Moïzes hag a lavaras dezha.

« Guelet o c'heus oc'h unan petra' meus great d'an Ejiptianed hag e pe fessoun e meus ho touget beteg ama, evel ma toug an er koz he ered bihan var he zionaskel. Ma selaouit va mouez ha ma talc'hit mad d'an allians great entrezomp, petra bennak ma zeo d'in ar bed-holl, gouskoude e touez an holl boblou c'hui a vezo pobl Jehovah, eur rouantelez a veleien hag eur vroad santel. »

Pa deuas Moïzes da zigass komzou Doue d'ar bobl, ar bobl a-bez a lavaras var eur vouez : « Ni a viro penn-da-benn gourc'hemennou an Aotrou. »

« Kent a-ze, a lavar Jehovah, me a ziskennno beteg ennoc'h en eur goabren denval. Ar bobl-holl a

glevo va mouez hag evel se, iviziken, e kredo d'am c'homzou. Lavarit d'ho tud en hem burifia ha goalc'hi ho dillad; rak a-benn tri dervez e tiskenno an Aotrou dirak an holl, var menez 'Sinaï. Merka' reoc'h dezho tro-var-dro d'ar menez bete pegeit e c'hellint dont, hag e lavaroc'h dezho : « Diouallit da bignat oc'h ar menez ha, zo-ken, da douch outha. Rak an neb piou bennak a douchou outha a vezo lakeet d'ar maro. »

Setu d'an trede dervez, savet dija huel an heol, e kreiz ar gurun hag al luc'hed, e veljot souden eur goabren denval e c'helei ar menez. Klevet oue soun skiltruz an droumpill. Neuze Moïzes a gassas ar bobl euz ar c'hamp bete traon ar Sinaï. An holl a grene gat ar spount. Hag hi e kichen ar menez, n'her guelent ket gat ar vogidel a deue anezha evel euz a eur fourn goret. Soun an droumpill a ia c'hoas var gresk, hag euz ar c'hern huella e klevchot e tisken, pounner ha krênv, mouez Jehovah :

« Me eo an Aotrou ho Toue ; me eo a meus tennet ac'hanoc'h euz an Ejipt, euz ar sklavaj. No pezo ken Doue nemed hon-me ; ne adoroc'h nak imachou kizellet, na patrom netra euz ar pez a zo en Env, var an douar pe er mor. N'ho adoroc'h ket ; ne rentoc'h dezho neb enor. Rak me eo an Aotrou, an Doue krênv, an Doue jalous a buniss pec'hed an tad var he vugale beteg ar pevare rumm : Mez bezoun ive an Doue a drugarez eb muzul evit ar re am c'har hag a vir va gourc'hemennou.

« Ne gemeroc'h ket e ven, eb kaoz, hano an Aotrou ho Toue.

« O pezet sonj-mad da zantifia deiz ar repo. C'hoec'h dervez o c'heus da labourat ; hogen, d'ar

seizvet ne labouroc'h ket, na c'hui, nak ho mipien, nak ho loened, nak an dianveziad a ve en ho ti. Rak an Aotrou en deus great an Env hag an douar e c'hoec'h dervez hag ar seizved, deiz he repo, en deus benniget ha great santel.

« Henorit ho tad hag ho mam evit ma vevoc'h pell var an douar.

« Ne lazoc'h ket.

« Ne reo'h ket a louztoniaj.

« Ne laeroc'h ket.

« Ne zougoc'h ket a falz-testeni a eneb ho nessa.

« Ne c'hoantaoc'h ket kaout ti ho nessa, nak he c'hreg, nak he vev, nak he vatez, nak he ejen nak he azen, na netra euz ar pez a zo dezha. »

Epad m'edo Doue ec'h embann an dek gourc'hemenez, ar gurun a groze, al luc'hed a dreuze ar c'hoabr, an droumpill a strake, ar menez a zivogede evel pa vije krog an tan ennea. An Israelited a ioa strafillet hag anter-varo, Mont a reant var ho c'hiz hag e lavarent da Voizes : « Komzit ouzomp c'hui oc'h unan ha na glevo ket mui hon diskouarn mouez an Aotrou pe e rankimp mervel holl. » « Bezit dinec'h, a lavaras-hen dezho. Doue ne ra kement-ma nemed evit lakaat he zoujans doun en ho kaloun evit ne bec'hoc'h mui. » Mez kaer en doa lavaret, ar bobl spountet a dec'has dioc'h ar menez.

Moïzes, neuze, var an urz roet dezha gat Doue a ieas he unan er goabren. Eno Jehovah a gomzas outha epad daou-ugent dervez ha diou-ugent nozvez dioc'h-tu. Urz a roas dezha da zével eun tabernakl, eun telt braz, hag eno e tlie chom evel eur Roue e touez he bobl. Er penn huella euz an templze, a ellet da ziblass pa garet, oa eul loden hanvet

al *leac'h santela* a dlíe beza lakeat ennhi an *Arc'h a allians*. Er c'houfr presiuz-se, great gat koat Setim, goloet gat guiskajou aour, e tlie beza gorroet taoliou al lezen, guialen Aaron hag eur pod leun euz ar mann dastumet en dezert. A zioud an Arc'h oa patrom daou Cherubin, dispak gatho ho diouaskel, ha varnho eun daol aour fetis evit beza golo an arc'h. An daol-ze oa tron an Aotrou. Ac'hano eo e komze ouz an dud. En eil loden euz an telt hanvet al *leac'h santel* edo taol an daouzek bara eb goell a vije kinniget da Zoue bep sizun en hano an daouzek broad pe tribu a Israel; ar c'hantolor aour a zeiz brank, eul lampr var peb hini ag a vije var elum noz-deiz hag aoter aour ar c'hoez-vad. Var hounnez ar belek braz a deue bep mintin ha bemnoz da zevi ezans dirak an Holl-Galloudek. Goudeze e velet aoter ar sakrifisou. Eno e vije kinniget anevaled da Zoue. Erfin, er penn izhela edo leur an telt, loden ar bobl, he blass epad ar seremoniou santel.

Doue a ordrenas ive da Voizes dispatia tribu Levi evit he c'honsakri d'he zervich. Al levided euz ar renk izhela a dlíe dioual an tabernakl. Huelloc'h edo ar veleien a ne dlíent beza kemeret nemed e famill Aaron. Ar re-ze a dlíe lakaat freaz ha sklear al lezen dirak ar bobl hag ober ar sakrifisou. Erfin, er penn huella edo ar belek bras Aaron. Hema, ha var he lerc'h ar c'hossa euz he famill a varne an holl draou a zelle ouz ar justis hag ouz ar relijion. Hen ebken, eur vech er bloaz, en dije konje da vont e diabarz al *leac'h santela* da zeiz braz ar Binijen.

Ouspen ar sakrifis dioc'h ar mintin ha dioc'h an

noz, Doue a c'houlennas evitha ar seizved dervez hag an deiz kenta euz miz al loar, hanvet Némémie. Tri gouel braz a dlíe digass da zonz d'an Israelied euz madoberou kaer an Aotrou evitho : Gouel Pask a zigasse memor euz an deiz ma 'ouent bet tennet euz an Ejipt; Gouel ar Pantekost, euz an allians great var menez Sinaï; Gouel an Tabernaklou, euz ar miraklou en devoa great Doue dindan an teltou, er gouelec'h.

Doue a roas dezha goudeze eun niver a lezennou divar benn ar madou, andouar, ar famill, ar drempred gat an dud dianveaz, gouarnamant ar bobl.... hag e roas dezha diou daol vean, skrivet varnho gat he zourn goure'hennnou an Décalogue.

Epad m'edo Doue e komz gat Moïzes, an dud a ioa nec'het hag a c'houlenne etrezo perak ne ziskenne ket ar profet divar ar menez. Marvad, a zonzent, e vezo maro er goabren pe marteze Doue en deus savet anezha en env evel ar profet Enoch guechall; ha petra' deuint-hi da veza en dezert-ma, eb den d'ho c'hass ha d'ho difenn. Pa ze guir Jehovah, daoust d'he bromessaou kaer, ho dileze, var ho meno, e zejont da gaout Aaron ha d'her pedi da ober dezho doueou ag o dije gelllet ho zenna euz ar broiou gouez-ma. Aaron a boanias d'ho distrei diouz eun henvelep torfet. Mez goude beza her pedet her gourdrouzont brema. — Evit gounid amzer, e c'houlennas digatho ma vije digasset dezha an holl bloukou aour a ioa oc'h diskouarn ho merc'hed. Peger mantret ne oue ket Aaron pa velas taolet, e ken nebeud amzer, e c'harz he dreid ar pez a c'houlenne. An holl aour-ze a zo lakeat e teuz, taolet en eur moull hag ac'hano e teuas din-

dan furm an ejen *Apis*, Doue braz an Ejiptianed Kerkent a m'her guellas, ar bobl a zirollas da grial: « Israël, setu a-ze an Doue en deus ho tennet euz an Ejipt. » Antronoz, oue eur fest kaer en henor al leue aour; kinniget oue dezha sakrifisou, hag en hem lakejont holl da zebri ha da eva, da zansal ha da ebat ervez kustumou an idolatred.

Doue a vele pec'hed ar bobl hag a lavaras da Voïzes: « Diskennit divar ar menez. Israël, tennet ganeneuz an Ejipt, a zo e paouez terri va lezen. Great en deus eul leue aour hag emañ e kinnig dezha sakrifisou evel d'he Zoue. » Moïzes neuze a bed evit he bobl. « Nan, a lavar an Aotrou; lezit ac'hannon da zistruja ar bobl-se ker kalet a benn ha me ho lakaio e penn eur bobl all niveruz. » Aotrou, a lavaras adarre Moïzes, ne zistrujoc'h ket ar bobl-mañ o c'heus saveteet dre eur mirakl euz ho c'holl galoud. « Ne dale ket ar boan, a lavarfe an Ejiptianed ho zenna diganeomp evit ho laza var ar menez. Bezit sonj euz Abraham, Isaac ha Jacob, o c'heus prometted dezho o dije bet eul lignez puill evel ar stered euz an Env hag a dliec'h da gass d'an douar a vennoz. Bezit trugarezuz. »

Ar beden a blijas da Zoue. Rei a reas he c'houlenn d'ar profet; ar bobl ne vezo ket distrujet; mes red e vezo dezha kaout pinijen. Pa oa diskennet Moïzes, taoliou al lezen gatha, Josue a c'houlennas digatha a ne gleve ket iouadennou a vrezel: « Nan, a respountas-hen; mes klevet a ran kanaouennou a levez. » Pa ouent deuet tost d'an teltou, e veljont an idol udur ha bandennajou tud e tansal en dro dezha. Er meaz anezha e unan e taolas an diou daol a ioa en he zourn hag ho bruzunas ouz ar roc'h.

Kemeret a ra neuze al leue aour hag her-stlapias en tan. Pa zeo lakeat e ludu e vesk anezha en dour hag e ra d'ar bobl he eva. — Neuze e tistro, varzu Aaron hag e rebech dezha beza sikouret ar bobl da ober ar pec'hed-se a idolatri. Aaron a daolas ar beac'h var ar bobl hag ar gourdrôuzou en devoa great dezha. « Ama, eta potred, ama bugale Israël, ar re ac'hanoc'h o deus c'hoant da venji an dishenor great da Jehovah! » Kerkent, emañ en dro dezha bugale Levi. — « Kemerit ho kleze, a lavar an den doue, iit treuz-ha-treuz d'ar c'hamp; lazit didruez kement a ador an idol, na pa vent ho pугale, na pe vent ho tad. » Bugale Levi a zentas raktal ha tri mil var n'ugent den a guezas en deiz-se dindan ho c'hleze.

Antronoz an holl a ioa strafillet hag e kaon. Moïzes a lavar dezho: « Pec'het o c'heus ha pec'het braz. Me'ia da bignat varzu an Aotrou da velet a me a ello kaout ar pardoun evidoc'h. »


Digemeret gat Jehovah e c'hanzavas torfed ar bobl hag e c'houlennas digatha sellet a druez outha. « Pardonit d'an dud reuzeudik-se, a lavare-hen, pe otramant tennit va hano divar al leor a vuez. — Divar al leor a vuez, a lavar an Aotrou, ne dennan nemed hano ar pec'heur. Kassit Israël varzu an douar prometted; me a zigasso d'eoc'h eun eal evit diskuez an hent. Mez ne fell ket d'in chom mui gat ar pennou kalet-mañ gat aoun d'ho bruzuna en hent. »

Ar bobl, pa glevas ar c'hoimzou c'huero-ze a zirollas da ouela ha, var urz Moïzes, pep hini a ziviskas he zillad brao e sin a gaon. Moïzes a reassevel telt an allians pell diouz ar c'hamp, evit ma c'helje

eno an Aotrou komz ouz an dud. Di e zea he unan da zivis gat Doue evel eur mignoun gat he vignoun: « N'o c'heus ket lavaret d'in c'hoas, emezha eun devez, piou eo an eal a dle kerzet en hor raok. Ah! m'am beus gellet plijout d'eoc'h, evel ma o c'heus lavaret d'in, ne dec'hit ket diganeomp; Distroit e kreiz ho pobl. Anez, hor lezit en dezert-ma: rak ebdoc'h evit hon difenn a dreuz ar broiou, penaoz e c'helfemp-ni kaout fizians? » Doue a zentas ouz he zervicher ha prometti a reas kerzet adarre e penn he bobl. « Derc'hel a rin d'am ger, emezha; rak ho c'hano a zo skrivet doun em c'haloun. »

Doue a gomze outha gat kement a vadelez ma kemas Moïzes kalz hardisegez gantha. « Diskuezit d'in ho kloar, a lavaras dezha eun deiz. » — Doue a respountas: « Diskuez a rin d'eoc'h an traou kaer a zo kuzet dindan va hano a Jehovah; mez den ne ell gullet va fas, araok beza tremenet dre ar maro. »

Evit starda ar peoc'h great etre Doue hag Israel, Moïzes a bignas evit an eil guech var ar menez hag a jommas eno adarre daou-ugent dervez ha diou-ugent nozvez. Pa ziskennas, Doue a roas dezha diou daol all, skrivet varnho gat he zorn an daou-zek gourc'hemen. Ho dougen a rea en he zaouarn ha na c'houie ket oa savet daou vann sklerijen var he dal hag a rea evel eur gurunen. Aaron hag an dud koz a ioa assamez gatha, o velet ar sklerijen-zeker skeduz, ne gredont ket tostaat outha. Moïzes ho galvas hag a gemennas d'ar bobl dont da glevet gourc'hemennou Doue. P'en devoue perachuet da gomz outho, e c'holoas he vizaj ha n'he dizoloas mui goudeze nemed pa zea da zivis gat Doue.



VI.

KLEMMOU HA GROSMOL.

BLOAZ a ioa abaoe m'oa kampet an Israeilited e traon ar Sinai pa veljot ar goabren mirakuluz e sevel divar tabernakl an al-lians hag everka dezho diblass. An droumpillou a zoun ha peb tribu en hem laka en hent da heul he mistri. Arc'h Jehovah a iea skeduz er penn araok. « Savit, Aotrou, a grias Moïzes ha ra dec'ho an enebourien dre ma ho kuelint! » An arme a gerzas tri dervez, ken na jommas ar goabren a-za, e gouelec'h *Pharan*.

E leac'h trugarekaat an Doue en doa tennet anezho euz an Ejipt evit ober anezho he bobl muia karet, an Israelited en hem roas adarre da c'hroz-molad a eneb Moïzes. Perak ober dezho bale keitall dre an dezert? A c'hoant en devoa d'ho lakaat da vervel gat ar skuisder hag an dienez? — Ar binijen ne zaleas ket varlerc'h ho c'hlemmou. Lost an arme, koz-traou digaloun, eo a gri e goassa er penn pella euz ar c'hamp. Doue a laosk an tan varnho evit ho devi. Ar bobl a gri gat ar spount. Moïzes neuze en hem laka da bedi hag an tan a varvas.

Mes kaer a ioa skei var ar bobl dizent-ma ne

ellet ket dont a-benn anezha. Nebeudik amzer goudeze, ar rummad tud dister, anter-dizoue, deuet euz an Ejipt da heul bugale Israel douget evit ho c'hof en hem lakeaz da geuzi defot n'ho deus kig da zrebi. Lod zo-ken euz an Israelited gounezet gat ho c'hlemou hag ho irvoudou, a ia a-du gatho « Sonj or beus, a lavarent-hi, en Ejipt, ne vanke morse var hon taol pesked mad hag evit netra, kombrez, melons hag ougnoun delikat. Allaz ! kaer or beuz ama sellet en dro d'eomp, ne velomp nemed ar mann divlaz-se a ra donjer d'eomp. » Pa velas anchho e ouela dirak ho zeltou, defot kaout kig da zribi, Moizes o ia drouk ennha hag e ped stard an Aotrou da denna digatha ar vuez evit ne ranko ket pelloc'h dougen var he ziskoaz eur zam hag a gav re bounner. Mez Doue a respountas dezha : — « Diskleriit d'ar bobl e roin dezha kig da zribi e doug eur miz ken n'hen devezo donjer outha. Me' zesko dezho keuzi d'an Ejipt hag en hem glemm euz an Doue a gerz en ho zouez. »

Moizes a c'houlenne e pe leac'h e vije kavet kig aoualac'h evit karga ho c'hof da dri milioun a dud epad miz. Rak ne vije ket aoualac'h gat holl anevaled Israel ha pa vije lakeat da heul an holl pesked euz ar mor. Doue a lavaraz dezha n'oa ket berreat he vreac'h hag edo he gomz e vont da zeveni.

Hag evit guir, sevel a reas eun avel grenv ag a zigassas euz an tu all d'ar mor bandennou Coailled. Kement a ioa ma zoa goloet gatho ar c'hamp hag an douar tro-var-dro. Nijal a reant a veac'h daou droatad dioc'h an douar. Evelse n'oa ket diez ho faka gat an dourn. Mall oa gat peb hini dastum

eun niver mad hag ho lakaat da zec'ha. No doa ket peur-zebet ho laboussed pa ouent skoet gat dorn an Aotrou Doue. Eur c'hlenved diremed a gassas d'ar bez eul loden vraz euz an dud fall-ze, an tam kig c'hoas en ho ginou.

Moizes en devoue da c'houzaon euz a berz he dud zo-ken. He vreur Aaron hag he c'hoar Mari, poulzet gat ar goarizi, a deu da ober rebechou dezha abalamour ma zoa en hem zizenoret, var ho meno, en eur zimezi da eur Madianitez. « Var digarez, a lavarent-hi, en devoa Doue komzet outha, ne dlie ket en hem zével dreist ar re all : rak hi ive o doa klevet mouéz Doue. » Moizes, an doussa euz a vugale an dud, a gleve ho c'homzou c'huero eb eil-geria. Mez Jehovah a deuas d'hen difenn. Goude beza roet urz dezho ho zri da vont d'an tabernakl e tiskennas er goumoullen.

« Pa gomzan ouz eur profet bennak, emezha, eo dre skeud pe dre uvre. Hogen pa gomzan gat Moizes, ar guella euz va zervicherien, e c'hen hem ziskuezan dezha sklear, eb troidellerez ha var eun. Diviz a ran gatha ginou oc'h ginou. »

Goude ar geriou-ze e tec'h kuit goude beza merket dezho anad aoualac'h oa drouk ennha. Kement-se a veljot eb dale. Rak Maria oue goloet a lornez, guen-kann evel an erc'h. Aaron a bedas Moizes d'he erbedi da Zoue. Doue he fareas goude seiz dervez a renkas da dremen er meaz euz ar c'hamp.

Erruet e-tal bro Kanaan, Moizes, var urz an Aotrou, a gassas eur prins euz a bep tribu da ober eur zell var an douar-ze promettet d'he bobl. E tlient goulén ha gulet a kalz tud a ioa er vro, ha krenv oant ; ha pinvidik oa an douar, ha koat a

ioa pe n'oa ket ; ober eur bale dre ar c'heariou ken libr ken klozet gat mogeriou. « Bezit tud a galoun, emezha, ha ne zistroit ket eb digass d'eomp frouez euz ar vro-ze. »

Ar mare a ioa neuze da zastum ar rezin. Goude beza baleet dre bep korn euz ar Palestiin, e tistrojont d'ar c'hamp a ioa neuze e kichen *Cadès*. Bez' oa gatho fiez, avalou grenad ha kaiz frouez all ha, dreist-holl, eur blokad rezin hag a ioa re veac'h da eun den. Ar skour o devoa distaget gat ar rezin ha daou zen hen douge eur penn euz ar vaz var bep skoaz. Dioc'h-tu an dud a vodaz en dro dezho. Dis-paka' rejont ar frouez burzudus dirazho ha kounta rejont ar pezo o devoa guelet. « Bet ounp, emezho, dre ar vro gaer-ze, ed-a-ed, ha guir eo e red ennhi al leaz hag ar mel. Mez, siouaz ! an dud or beus guelet a zo krenv evel jeanted hag ho c'heariou ne elfe den ho c'hemeret dre nerz. Goude beza kannet Amalec e tu ar c'hresteiz, o pezo da c'hourin, e broiou ar menez oc'h an Hetheaned, ar Jebuseed hag an Amorrheaned ; ha goudeze oc'h ar C'hananeed a zo e chom var ribl ar mor hag ar Jourden. »

Ar bobl a en hem jal adarre goassoc'h eget bis-koaz hag a en hem zao ouz Moizes. Kaer en deus Caleb lavaret dezho n'eo ket guir penn-da-benn ar pezo deus kountet ar gannaded all ; ar re-ma a zalc'h bepred da doui n'oa ket e galloud den stourm ouz tud ker krenv ha ker braz. « E kichen ar jeanted-se, emezho, ne oamp nemed killeien-raden da velet : hag an douar euz ar vro-ze a zreb ar re'zo e chomm ennhi¹. »

¹ Abalamour n'eo ket eur vro iac'huz.

Pa glevont ar c'homzou-ze, en daouzek tribu e sao an dizesper. E doug an noz n'eus nemed hirvoud ha iouherez. « Perak, emezho, no deus ket Moizes hag Aaron lezet ac'hanomp da vervel en Ejipt ? hag hirio, zo-ken, a ne ket guelloc'h d'eomp mervel er gouelec'h-ma eget beza lazet gat ar jeanted-se ; eget guelet kass da sklaved hor gragez hag hor bugale ? hag oc'h-penn, perak ne zistrofemp ni ket d'an Ejipt ? » -- An ali-ze a blijas d'an holl ha n'oa ken affer mui nemed kaout eur mestr da hentcha ar bobl bete traonien an Nil.

Moizes hag Aaron ne ellent nemed daoulina ha pedi. Caleb ha Josue, a zavas drouk ennho, pa veljont penaoz e teue an dud-se da fall-galouni. Regi a reont ho dillad dirak ar bobl hag en hem zével a reont a eneb an dud penn-follet-se. « Gat sikour Doue, emezho, ni a vezo mistri euz ar vro gaer-ze ker pinvidik. Paouezit d'en hem zével oc'h Doue ha da grena dirak ar boblou-ze ne vezint nemed eur c'hinaouad evidomp. Rak int-hi a zo eb sikour, ha ni a zo Doue ganeomp. » Mez ho mouez a ioa mouget gat ar iouherez ; hag an dud-se a c'hourdrouze ho laza a daoliou mein, pa lakeas Doue he c'hloar da bara a zioc'h an tabernakl hapa c'halvas Moizes :

« Bete peur, emezha, e trouk-komzo ar bobl-se ac'hanon ? Pegeit e chommo-hen c'hoas eb kredi d'am c'homzou, goude kement a viraklou a meus great dirazha ? Mont a ran d'hen distruja ha me a lakaio ac'hanoc'h da veza ar penn euz a eur bobl all ag a vezo brassoc'h ha galloudussoc'h eget hema.

— « A petra' lavaro an Ejipsianed, a respountas

Moïzes, hag ar boblou euz ar vro-ma ? Setu ama petra' livirint : Goude beza dispartiet Israël, goude beza komzet outha kaloun-a-kaloun ha beza her c'hasset beteg ar gouelec'h gat he goumoullen ske-duz ; he Zoue n'en deus ket gellet he gass beteg an douar promettet ha setu perak en deus digoret dezha eur bez er gouelec'h-ma. Nan, nan. Bezit Doue a drugarez ha pardonit d'ar bobl-ma evel m'oc'h eus great beteg-hen abaoue ma zeo deuet euz an Ejipt.»

— « Pardonit a rin, a lavar an Aotrou, hag ar bed holl a zesko piou oun. Hogen an dud dianaoudek-se, bet dek guech test euz va miraklou hag o deus dek guech great fae var va galloud, ne velint ket an douar promettet d'ho zadou koz. Kit ha kassit dezho va zetans : « Great e vezo d'eoc'h ervez ho koulén. Ho korvou a jommo sebeliet er gouelec'h. Euz an dud a zo tremenet gatho ho ugent vloaz ne dei ket unan en douar santel nemed Caleb ha Josue. Lavaret a reac'h e vije hopugale sklaved e Kanaan ; mad ; ar re-ze ebken a ielo d'ar vro-ze. Brema, distroit etrezek ar mor ruz ma n'ho c'heus ket a c'hoant da guezha etre daquarn an Amalestid a zo e c'hortoz ac'hanoc'h en tu all d'ar menez. »

Pa deuas euz an tabernakl, Moïzes a gavas an dud glac'haret. Dija ar gannaded fall a ioa bet skoet gat ar maro. Setu perak, pa lavaras d'ar bobl ar zetans douget gat Doue, ar bobl a zirollas da ouela. Er meaz anezha he unan hag evel follet, e fellas dezha mont d'ar brezel antronoz mintin mad, e pinijen d'he bec'het. Kaer en doa Moïzes lavaret d'an dud-se n'edo ket Doue gatho, n'edo ket an arc'h allians e penn an arme hag oant sur da veza

kannet. Sailla rejont var an inimié. Kannet ouent ha red ouc dezho tec'het beteg Horma.

Ar goal-reuz-se ne zigoras ket-dezho ho daoulagad. Nebeud dervezioù goudeze, dañu c'hant anter kant euz ar pennou brassa en Israël, er renk kenta Coré euz a dribu Levi, Dathan hag Abiron euz a dribu Ruben en hem zavas a eneb Moïzes hag Aaron. Al levited a felle dezho tenna digat Aaron he garg a veleik braz ; ha bugale Ruben, map hena Jacob a felle dezho beza e penn Israël e leac'h Moïzes. Core en doa zo-ken lakeat ober ezansoueroù nevez evit kinnig ezans da Zoue var aoter ar c'huezvad.

— « Pa zeo guir ounp eur bobl a zent, pobl Doue, a lavare da Voizes an dud ourgouilluz-se, perak o c'heus-hu kemeret eb guir galloud var ar re-all ?

— « Varc'hoaz, a lavar servicher mad an Aotrou, Jehovah a roio da anaout pere eo he dud. C'hui a gemero o c'hezansoueroù evit kinnig ezans var an Aoter ha Doue a rei an dibab. Bugale Levi, a n'oa ket aoualac'h a enor evidoc'h beza bet dispartiet dioc'h ar bobl evit servich an tabernakl ? Evessait-mad ; ne ket oc'h Aaron, mez oc'h Doue en hem zavit brema. »

Goudeze e kemennas d'an daou all Dathan hag Abiron dont d'he gaout. Mez an daou-ma a reuzas a-grenn mont dirak cun den ag en doa ho zennet euz an Ejipt, e leac'h ma zoa grignoliou leun a ed, evit ho digass da vervel er gouelec'h-ma, var digarez rei dezho parkeier ha guiniennou ha n'emaint e nep leac'h. « C'hui a garfe, marvad, a lavarent c'hoas, tenna hon daoulagad euz hor penn goude beza hon trellet keit amzer gat ar goaziou leaz ha

mel ! N'oc'h anavezomp ket evit hor mestr ha ne deimp ket dirazoc'h. »

Antronoz, ar bobl a ioa bodet dirak an tabernakl. Core hag he zaou-c'hant anter kant konsort a ioa peg en ezansouer koulz hag Aaron, pa verkas ar goumoullen, en eum taol-kount, edo eno Jehovah.

— « Tec'hit dioc'h an dud-ma, a lavaras an Aotrou da Voizes ha da Aaron, ma lazin anezho beteg an diveza.

— « Aotrou, a lavaras an daou vreur en eur guezha d'an douar, a punissa'reoc'h an oll abalamour da bec'het eul loden bennak ?

— Nan ; roit urz d'ar bobl da bellaat dioc'h tel-tou Core, Dathan hag Abiron. »

Moizes, ha d'he heul an dud koz a Israel, a ias dre ar c'hamp, evit rei urz d'an dud da dec'het dioc'h an dud difeiz, nemed c'hoant o dije da veza kollet assamez gatho. Dathan hag Abiron a ioa en ho za e dor ho zelt, fier-braz, gat ho gragez, ho bugale hag ho mignouned.

— « Bugale Israel, a lavar Moizes, brema sou-den c'hui a velo pe me a gomz ac'hanon va unan pe euz a berz Doue. Ma varv an dud dizoue-maevel ma varv an dud all, me c'houlén tremen evit laer va c'harg : Mez avad, m'ar teu Doue, dre eur mirakl all, da zigeri an douar ha da stlapa en ivern e beo ar re a en hem zav em eneb, anzavit o deus blas-femet a eneb an Aotrou. »

A veac'h en doa peurlavaret he gomz ma tigoras an douar dindan treid an dud fall-ze hag ouent lounket gat ho zeltou hag ho holl danvez hag an douar a glozas varnho. Eur iouhaden ebken a rejont, mez skrijuz oa hag holl Israel a dec'has leun

a spount. Er memez amzer tan an env a lakea e ludu an daou c'hant anter kant levit a ioa gat an ezans.

Ar bobl a ioa strafillet, mez n'oa ket chenchet, ha kreski a rea zo-ken he gounnar. Moizes hag Aaron a oue tamallet da veza bet kirriek euz distruj ar bobl. Kement a imor a ioa outho ma renkjont mont da guzet en tabernakl.

« En hem dennit pell dioc'h an dud-se, a lavar dezho an Aotrou ; emaint e vont holl da veryel dioc'h-tu. » An tan a rea dija kalz distruj varnho pa gassas Moizes he vreur Aaron e kreiz ar bobl. Eno en he za, etre ar re veo hag ar re varo, an ezans en he zourn, Aaron a bed Jehovah da zellet a druez ouz an dud reuzeudik-se. An tan a varvas ; mez dija pevarzek mil seiz kant den a ioa devet, eb kounta Core hag he gonsorted.

Doue a ziskuezas prestik dre eur mirakl pegen huel oa savet Aaron dre he garg a veleka braz. Urz a roas da lakaat en tabernakl e kichen guialen Aaron daouzek guialen d'ar brinsed euz a beb tribu. Antronoz, guialen Aaron glaz-kaer a oue gueleket gat holl bobl Israel goloet a vokedou hag a frouez. Moizes he gorroas en tabernakl e memor euz an dervez braz-sè.





VII.

AR PROFED BALAAM.

Nao bloaz ha tregont a ioa abaoe m'oa deuet Israel-euz an Ejipt, tregont guech en doa kampet dre an dezert, eb gellout morse mont e bro he dadou koz. Evel m'en devoa lavaret Doue, eskern ar re a c'hrosmole hag a en hem zave en he eneb a ioa ama-ahont a leiz gouelec'h an Arabii. Ar zonzj euz ar reuziou tremenet, ar guel euz ar pinijennou a zigasse bemdez an Aotrou Doue a zônaas ar bobl-se a nebeudou hag her boazas da blega da eur mestr, da zougen respet d'al lezen, da gaout doujans evit Jehovah ha d'her lakaat kalz huelloc'h eget mil doue faoz an Ejipt.

Eur boan vraz a dlïe c'hoaz Moizes da gaout. D'an deiz kenta euz an daou-ugentved blavez, e teuas da gampi e Cadès, e gouelec'h Sin, el leac'h m'oa het ar bobl c'hoas eur vech diaraok. An dour a ioa deuet da vankout ha fistoulerien fallagr a en hem zavas adarre ouz ar profed. « Perak, emint-hi, en deus Moizes digasset kement a dud e kreiz ar c'herrek-ma, n'eus na plass da ada, na da blanta, nak eur berad dour da derri ar sec'hed? » Moizes a c'houlennas kuzul digat an Aotrou; hag an Aotrou a lavaras dezha dastum ar bobl ha, dirazha,

evel en doa great guechall en Horeb, skei var ar garrek gat he vialen ha lakaat an dour da darza anezhi.

Pa edo e vont da ober ar mirakl evit an dud dia-naoudek-se, Moizes en devoe e goueled he ene eul lastez difizians, ha ne ellas ket da guzet dirak ar bobl. « Ouenn dud diuj ha gourd da gredi, emezha, a gelloud e reimp-ni tenna dour euz ar garrek-ma evit tud evelloc'h? »

Hag e skoas var ar mean eur vech, ha goudêze eun eil guech. D'an eil taol an dour a lammas puill euz ar roc'h hag o devoe kement a garent eva, hi hag ho anevaled. An tammik difizians-ze, difizians ag en doa he vreur Aaron evellda a zisplijas kalz da Zoue. Setu perak e lavaras raktal dezho ho daou : « Abalamour, emezha, m'o c'heus manket a feiz hag izeleat va gloar dirak Israel, ne gassoc'h ket va fobl d'an douar promettet. » Soubl dindan dour Doue a sko ar re a gar, Moizes a glevas he zentans eb ober an disterra klemmaden.

Ac'hano e zeas da gampi e kichen menez Hor. Hema a oue evitha eur menez a c'hlac'har. Nevez-marzo oa, e Cadès, he c'hoar kement karet, Mari, an hini a ioa bet e veilli var he gavel, var ribl an Nil. Sounet oa ive an heur da gimmiada diouz he vreur. Eun devez, Doue a lavaras dezha ; « Aaron a zo e vont da gaout he dud koz. Ne dei ket d'an douar promettet abalamour en deus bet ive difizians ac'hanon. Kassit anezha gat he vap var gorre ar menez. Eno c'hui a denno digatha he viskaman-tchou a velekg hag ho guiskoc'h da Eléazar. El leac'h-se eo e tle Aaron echui he belerinaj. » Moizes a zent ouz Doue ; pignat a ra var ar menez gat Aa-

ron, dirak ar bobl. Erruet var gorre, e tennas digat he vreur he ornamantchou a velek braz hag ho lakeas-da Eleazar. Neuze Aaron, he vreur, he zikour hag he vignoun abaoe daou-ugent vloaz a varvas. He gorr a oue lakeat en douar var ar menez ha neuze Moizes a ziskennas da gaout ar bobl gat Eleazar. Ar re-ma, pa veljont n'oa nemet-ho daou, a en hem lakeas da ouela hag en holl famillou oue douget kaon da Aaron epad daou-ugent dervez.

Etretant, Arad, Roue Kanaan, abalamour oa he stajou stag oc'h ar Palestiin, e tu ar c'hresteiz, a gemeras aoun rak an Israelited hag a deuas d'ho diarben gat he arme. En taoliad kenta en doa bet ar gounid; mez goudeze oue kannet gat Israel, he geariou diskaret, hag he zoudardet lazet a daoliou kleze.

Goude ar viktor-ze, Moizes a guiteas menez Hor hag a gemeras an hent a gass d'ar mor Ruz evit ober an dro da vro Edom ne felle ket dezha rei konje da vont dre he stajou, ha da denna goudeze dredu ar sao-heol varzu an douar promettet. Evel se e ranket asten an hent, ehana aliessoc'h e kreiz ar c'herrek, kreski ar skuider evit tec'het dioc'h an danjer. Eur vech c'hoas ar bobl a ieas en egar : « Mervel a reimpholl en dezert-ma, a grient en eur ouela; n'eus na bara, na dour; netra nemed ar mann-ma or beus heug outha. » Doue a reas dezho tevel en eur gass dezho sarpanter binimuz; hag ho flemm a zeve evel an tan. Pa veljont an teltou leun a gorr vou maro pe a dud klañv, ar bobl reuzeudik a bedas Moizes d'ho erbedi da Zoue : « Grit eur zarpant koueor ha stean teuzet assamez, ha stagit anezha ouz eur post huel e kreiz ar c'hamp. An

neb piou bennak a zello outha, a vezo pareet he c'houliou. « Setu komzou Jehovah. Staget oue a vel d'an holl, ha n'oa ken da ober nemed trei an daou-lagad varzu ennha evit beza pare.

Goude meur a zerveziad bale e tu ar sao-heol, e tioueziont e kichen menez Phasga, var ribl douarou an Amorrheaned. Goulen a rejont digat ar re-ma konje da vont a-dreuz ho bro ha prometti a reant n'o dije touchet nak oc'h ar parkeier, nak oc'h ar guiniennou, nak oc'h dour ar punsou, mez o dije heuliet an hent braz. Evit holl respount, ar Roue Sehon a lakeas he arme var zao hag a deuas da ober brezel d'an Israelited; mez kannet oue ha tenna a rejot digatha he stajou bete bro an Ammonited. Og, Roue Basan, a deuas da glask trabass outho ive. Hogen kannet ouent hen hag he arme hag an Israelited a deuas da veza mistri euz an holl vro.

Ac' hano, e zejont da gampi e meziou Moab, var ribl ar Jourden, dirak Jeriko. Balac, roue ar Moabited, hag he bobl n'oant ket eb enkreiz. Ne gavas netra guelloc'h eget goulen sikour an diaoul evit pellaat Israel. E Pethor, var ribl an Euphrat, e vev neuze eur sorser, brudet dre holl broiou ar sao-heol. Balaam oa he hano. Balac a gassas dezha ar lizer-ma : « Eur bobl deuet euz an Ejipt a zo leiz ar vro anezha hag azo e vont da goeza var va rouantelez. Deuit d'her mallozi. Krenvoc'h eo eget-homni, ha ne c'helfet ket a hent-all he ganna hag he gass kuit. Her gouzout a reomp : An hini a vennigit a vezo benniget, hag an hini a vallozit a vezo mallozet. » Ar gannaded a gassas d'ar sorser goulen Balac hag an arc'hant a ginnige evit he labour

Hogen, Balaam, goude beza goulennet kuzul digat Doue, a reuzas mont d'ho heul.

Eun niver brassoc'h a gannaded, dibabet e touez an dud vraz euz ar rouantelez a deuas goudeze euz a berz Balac da ginnik dezha peb seurt enoriou ha pinvidigez, ma kar mallozi Israel. « Ha pa deuffec'h da garga d'in va zi a aour hag a arc'hant, a respountas Balaam, ne elfen ket lavaret eur ger a eneb bolontez Doue. Gouskoude m'ar kirit, en noz-ma, me c'houlennou digatha petra en deus eta c'hoant da ober euz ar bobl-se. En dro-ma, setu ama ar c'homzou a glevas : « Kit da gaout Balac ; mez a-vad, grit ar pezh a livirin d'eoc'h. »

Balaam a zavas mintin-mad ; a lakeas ar bass var he azenez hag a ieas en hent laouen. Raksonjal a rea en dije great plijadur d'ar Roue hag e vije distroet gat eur bern pinvidigez. Arzantimant-se a zisplijas da Zoue ; ha Doue a gassas eun eal ag a jommas en he za, eur c'hleze noaz gatha en he zourn, var an hent a rea Balaam assamez gat daou euz he zervicherien. Pa velas an eal, an azenez spountet a reas eul lamm-treiz hag a ieas er park tosta. Skoet gat he mestr, diarbennet gat an eal, an azenez a dosta ouz eur voger hag a flastr troad ar sorser. Hema a zarc'ho ouassoc'h-ouaz var ar c'heaz loan hag evel ne gave an azenez tu ebed mui da dec'het, nak a gleiz nak a zeou, e koezas dirak an eal. Balaam, kounnaret, a skoe varnhi gat he fouet evel var eul leur-zi, pa glevas en eun taol-kount ar rebechou-ma e tont euz a c'hinou an azenez. « Perak derc'hei varnon evel-se bete teir guech ? — « Ne c'heus ket laeret an taoliou-ze, a lavar Balaam, abalamour d'al lammou sot a c'heus

great : ha penaoz n'em beffe ket ama eur c'hleze da blanta en da gov ? » — Gouskoude, eme an azenez, e touez ho loened a ne ket me eo a blij d'eoc'h ar muia ? ha gullet o c'heus ac'hanon eur vech ben-nak e c'hober ar penin fall ? — Morse, emezha. « Kerkent Doue a zigoras dezha he zaoulagad hag e velas neuze an eal, en he za dirazha, eur c'hleze en he zourn. Dioc'h-tu e taoulinas dirazha. An eal a rebechas dezha beza klasket miret bolontez Doue. « Me azo deuet ama, emezha, evit stanka an hent ouzoc'h ha ma n'en dije ket ho loan tec'het ker buhan divar-nha, edoc'h brema maro. » Strafillet-holl, Balaam a ginnigaz d'an eal distrei var he c'hiz ; mez an eal a roas urz dezha da vont bete Balac ha dreist-holl da non pas lavaret eur ger nemed dont a rafte euz perz Doue.

Roue ar Moabited a ioa eat da ziambrouk ar profed hag a reas dezha eun tamik rebech da veza kement daleet. « Setu me ama, a lavar Balaam ; mez, gouezit ervad, ne lavarin ket eur gomz ebken a ne ve lakeat gat Doue var va muzellou. » Pa ouent er-ruet en unan euz ar c'heriou pella euz he rouantelez, ar roue a gassas ar profed var al lec'hchou huel konsakret d'an doue Baal. Balaam a reas sevel eno eun aoter ha lakaat varnha seiz leue ha seiz maout evit ar sakrifis hag a ieas neuze da c'houlenn kuzul digat an Aotrou. Balac a c'hortoze anezha e kichen an aoter gat prinsed Moab. Da benn nebeud, e teuas dirazho hag e lavaras :

« Euz a vro Aram, euz a veneziou ar sao-heol en deus Balac great d'in-me dont ama da vallozi Israel. Hogen penaoz mallozi an hini ne ket mallozet gat Doue ? Euz kern ar roc'h-ma, e velan anezha,

ar bobl-se eb he bar, e unan e kreiz ar boblou. Ah ! piou elfe niveri bugale Jacob. Grass d'in da vervel evel ma varv an dud vad-se ! »

— « Aoualac'h a grias Balac ; benniga'rit e leac'h mallozi. »

— « Me a lavar ar pezh a deu em spered a berz Doue, eme ar profed. »

Ar roue her c'hassas neuze var gern menez Phasga. Ac'hano ne velet nemed eul loden euz Israel. Eno e savas eun aoter, en esper kaout digatha ar pezh a felle dezha. Mez eno adarre ne gavas ket ar pezh a glaske.

— « Doue n'eo ket edro evel an den, a lavar Balaam. Ar pezh a fell dezha n'eo ket evit mankout da zeveni. Digasset da venniga, eo red d'in benniga. E Jacob n'eus ket a idolou ; n'eus ket a zoueou faoz en Israel. Doue a zo gantha ha dija e klevan an drompill e sini ar viktör gounezet gat ar roue braz. Doue eo en deus tennet euz an Ejipt'ar bobl-se krenv evel an olifant. Setu e sao en he za evel eul leon, dispenn a ra he breiz hag eva a ra he c'hoad. »

— « Eur vech c'hoas, petra eo d'eoc'h, eme Balac, e leac'h mallozi, benniga ? »

Neuze e kassas ar profed var menez Phogor. Eno oue adarre savet eun aoter. En dro-ma, goude beza great eur zell var an dezert goloet gat teltou an daouzek tribu, Balaam, er meaz anezha e unan :

— « Oh ! emezha, peger kaer eo ho pavillounou, o Jacob ! Ho teltou, Israel, a zo koant evel an traoniennou goloet a vez huel, evel ar jardinou douret gat ar steriou, evel ar guez se dr plantet e tal an dour. Ho pugale vihan a gresko evel an dour euz ar feunteun. Hogen unan euz ho rou-

anez a vezo diskaret abalamour da Agag, hag he rouantelez a vezo tennet digatha. Ar bobl se tennet gat dorn Doue euz an Ejipt a lounko he enebourien, a vruzuno dezho ho eskern, ho zreuzo gat he virou. Eul leon eo ha ne gredo den hen dihuna. An nep piou bennak her bennigo a vezo benniget ; mez kement hini her mallozo a vezo mallozet. »

Balac a ia en egar oc'h Balaam ; strakal a ra he zaouarn an eil ouz eben hag e lavar : « Goap a rit ac'hanon. Ne rit nemed rei bennoz d'ar bobl-se e leac'h he vallozi. Tec'hit pell diouzin ; n'oc'heus ket guir da eul liard euz ar pezh a moa promettet d'eoc'h. »

— « A ne m'oan-me ket lavaret d'eoc'h, eme ar profed, n'em bije lavaret d'eoc'h nemed ar pezh a vije deuet a-berz Doue, daoust a ma o pije karget d'in va zi a aour hag a arc'hant. Mont a ran da zistrei d'ar gear ; mez, araok, selaouit c'hoaz ar pezh a lavar an Doue holl galloudek :

« Eur stereden a zavo euz Jacob, hag unan a zavo euz Israel ag a skoio rouanez Moab, a gasso da netra bugale Seth hag a lakai an Idumée da zoubla dirazha. Amalec a vo diskaret. C'hui, Sineaned, kaer o pezo sevel ho tiegeziou var ar menez, diskaret e vezoc'h gat an Assyrian. Allaz ! piou a vezo bèo pa rei Doue ar burzudou-ze. Erfin, e teui tud euz an Itali var ho batimantchou ag a ganno an Assyrianed, a gasso da netra an Hebreed hag a vezo ho unan diskaret d'ho zo goudeze. »

Evelse e komzas Balaam var urz an Aotrou. Evit tenna venjans euz an Israelited-ze en doa benniget en despet dezha, ar sorser brein a zeskas d'ar Roue Balac penaoz tenna malloz var pobl Israel. He alia

a reas da gass merc'hed Madian ha Moab da gaout an Israelited, e meziou Settim evit ho gounid da genta evel plac'hed fal hag ho lakaat prest goude da zaoulina dirak an doueou faoz. Ar pezh a lavaras a ziouezas. Doue ho funissas. Abalamour d'ho fe-c'hed pevar mil var'n-ugent Israelit a oue treuzet gat ar c'hleze. Evit ar Madianited, nebeud goudeze ouent kannet gat bugale Israel. Pemp euz ho rouanez a jommas var an dachen. Etouez ar re varo oue kavet ive Balaam, ar sorser a ioa bet kaoz euz a bec'hed Israel.



VIII.

MARO MOIZES.

GOUDE beza kannet an holl boblou a ioa tro-var-dro da vro Kanaan ha goude daou-ugent vloaz tremenet er gouelec'h, Moizes a ioa erruet var bord an douar promettet, gat c'huerc'h kant mil den a vrezel. Guelet a rea e tostea evitha an heur da vont da gaout he dadou koz. Araok kimmiada euz ar bed-ma, e fellas dezha star taad an allians pe ar vignouniaj great etre Israel hag an Aotrou. D'an daou-ugent-ved blavez abaoe m'oant deuet euz an Ejipt, d'an deiz kenta euz an unnekved miz dirak ar bobl bodet en dro dezha, Moizes a lakeas dirak ho daoulagad e ber gomzou gourc'hemennou ar Sinai hag istor an daou-ugent vloaz tremenet dre ar gouelec'h. E doug eur miz, bemdez goulou, e tigas da zonz dezho euz ar vad en doa great dezho an Aotrou Doue, euz ar miraklou en doa great evitho. Diskuez a rea dezho pe-gen diskiant oa bet ar bobl e trei kein da Zoue hag e pe fessoun oa bet punisset ho zadou. Komz a rea ive dezho euz ar viktorieu oant e paouez gounid var ho enebourien, ha ne oant nemed eur skeud euz ar viktorieu kaer a dlient da c'hounit er Palestiin, ma chommont mignoun da Zoue. Digass a ra da zonz

ive euz ar gourc'hemennou roet gat Jehovah var ar Sinaï e kreiz ar gurun hag an tan hag e lavaras goudeze : « Ia, c'hui a garo an Aotrou ho Toue a greiz ho kaloun, euz ho c'holl ene, euz ho c'holl nerz. Ar c'homzou-ze hag ar gourc'hemennou-ze a lakeoc'h doun en ho spered. Ho lavaret a reoc'h d'ho pugale. Sonjal a reoc'h ennho aliez en ho ti, a ed an hent, en noz pa ne gouskoc'h ket, ha dioc'h ar mintin pa zihunoc'h. Evit ma vezint bepred dirak ho taoulagad e skrivoc'h anezho var an trujou ha var doriou ho ti. »

Evel ma zoant douget da adori an idolou, e pouezas var an dever o devoa da ziual oc'h darempred an dud estren, da ziskar an idolou dre ma ho c'havhent var ho hent, ha da viret ña deint morse da gaout an divinour pe ar sorser. Ar bobl a ioa nec'het maro. C'hoant en doa da c'houzoud piou a vije deuet var-lerc'h Moizes da ziskuez dezho bolontez Doue. Ar profed goude beza sonjet er-vad ha lennet en amzeriou da zont a lavaras dezho :

« Goulaoui a rei an deiz ma tigasso d'eoc'h an Aotrou ho Toue, euz ho lignez hag euz a douez ho preudeur, eur profed evel d'hon-me. Hennez eo a dleoc'h da zelaou. E traôn menez Horeb c'hui a c'houlenne ouz Doue n'hen dije mui komzet ouzoc'h ha m'hen dije mouget an tan a roe kement a spount dre ar c'hamp. Doue a zelaouas ho peden hag a lavaras d'in-me neuze : « Me a denno euz a douez ho preudeur eur profed henvel ouzoc'h ; Me a lakai va c'homzou var he vuzellou hag hen ho c'hasso beteg enno. Goaz a-ze d'ar re ne zelaouint ket ar c'homzou a gasso dezho em hano-me. Rak me a venjo an dismegans o devezo great anezho. »

Pa lavare ar c'homzou-ze, Moizes a zonje er profed braz a dlïe dont er bed divezatoc'h ha ne doa nemed ar skeuden anezha. Guelet a rea en he spered an Hini a dlïe delivra ne ket eur bobl ebken, mez an holl boblou euz an douar, euz eur sklavaj kalz terruploc'h eget hini an Ejipt. Guir oan paskal, he c'hoad a dlïe savetei an'neou bepred goal-gasset gat an drouk-sperejou. Rei a rea, ouspen, d'he vugale e kreiz ar gouelec'h euz ar bed-ma eul lezen a allians evit ho bleina, eur mann diskennet euz an Env evit ho maga hag ar goad euz he galoun evit terri ho zec'hed. Evel Moizes, ema ive etre Doue hag an dud kabluz, he zivrec'h troet gatha etrezek an Env evit goulenn trugarez. Guelloc'h eget Moizes e paree ar gouliou great gat sarplant an ivern pa en hem lez da veza staget ouz ar groaz evit effassi pec'hejou he vreudeur. Tostoc'h c'hoaz da Jehovah eget Moizes e zoa ne ket ebken den an Aotrou Doue, mez an den-Doue, den ha Doue assamez.

Goude beza evel-se digasset da zonj d'ar bobl euz ar burzudou great gat Doue ha lavaret dezho ar burzudou a dlïe c'hoaz da ober, Moizes a lavaras eur vech c'hoaz dirak ar bobl dastumet dirazha, dirak prinsed an daouzek tribu, ar re goz, an doktored, ar goazed, ar merc'hed hag ar vugale, an allians o devoa touet gat Jehovah : « Ha brema, emezha, me'gemer evit test an Env hag an douar e meus lakeat dirak ho taoulagad ar vuez hag ar maro, ar bennoz hag ar malloz. Kemerit ar vuez, da lavaret eo, dalc'hit mad d'ho Toue. Karit anezha, servichit anezha bemdez, hag e vevoc'h e peoc'h, c'hui hag ho pugale, en douar hen deus touet rei da vugale Abraham, Isaac ha Jacob. »

Goudeze, evit deski dezho pegement a respet a dleont da zougen da leor al Lezen, al leor-ze skri-
vet gatha, pe evit lavaret guell, gat Doue e unan,
e lakeas anezha etre daouarn bugale Levi, ar ve-
leien a dlie dougen an arc'h a allians, hag an dud
koz euz ar bobl, gat urz da lenn anezha eur vech
bep seiz vloaz, da c'houel an tabernaklou, ha da
zeski evel-se d'an holl, goazed, merc'hed, bugale
Israel ha d'ar re all, penaoz douja da Zoue ha miret
he c'hourc'hemennou.

Doue a ra peb tra evit diarben he bobl hag en
distrei varzu ennhä pa vez dianket. « Pa vezoc'h e
repoz e kichen ho tadou, a lavar hen da Voizes,
Israel a droio adarre varzu an doueou faoz. Terri
a rei ar bromessaou en deus great d'in ken aliez a
vech. Red e vezo d'in kuzet dioutha ha digass varn-
ha a bep seurt reuziou. Skrivit eta en eur c'hantik
petra'meus great evit ar bobl-se, hag ar c'hantik-
se, c'hui hen desko da holl vugale Israel. Red eo
dezho her gouzoud dindan evor, he gana aliez hag
e vezo evidon eun testi e touez bugale Israel pa
zistroit varzu ennhon, en amzer ar boan. » Moizes
a berz Doue ha gat he zikour, a skrivas ar c'hantik-
ma en enor Jehovah hag her lennas d'ar bobl.

« Envou, selaouit : Douar, klevit va c'homzou ; me
a ia da veuli hano Jehovah.

« Jehovah eo an Doue parfet, just ha leal. Perak
eta o c'heus pec'het en he eneb, tud a ouenn dis-
kredik ha fallagr ? Hag evel-se e tleit beza gat ho
Toue, ho Krouer, ho Tad ?

« Digassit da zonj d'eoc'h euz an amzer guechall.
Goulennit digat ho tud koz hag e livirint d'eoc'h
petra en deus great Jehovah evido c'h. Pa zispartie

bugale Adam evit ober anezho meur a bobl, oa he
zonj dija var bugale Israel, he heritaj dibab. Her
c'haout a reas er gouelec'h, en eur vro digonfort,
hag e reas peb seurt stad anezha. Dezha e roas he
lezen ; hen diual a reas evel map he lagad ; hen
dougen a reas var he ziskoaz, evel ma toug an er
he laboussed bihan var he ziouskel evit deski dez-
ho nijal. Her c'hass a reas neuze var douar ar me-
neziou, el leac'h ma roe dezho ar parkeier kalz
frouez, an denved kalz druzoni, ar vinien blokajou
rezin, ar mean a roe mel hag ar reier kalz eol.

« Gouskoude ar bobl-se ker mignoun da Zoue,
pa z'eo deuet gallouduz ha kreñv a zo en hem zavet
a eneb he grouer hag he zalver, bete zo-ken stoui
dirak Doueou estren ha kinnig sakrifisou d'an dia-
oul. Jehovah, ho Doue, o deus dianavezet, dilezet,
disprijet !

« Pa velas Jehovah an oberiou euzus-se, he ga-
loun oue glac'haret hag e zeas drouk ennhä. Me
a guzo dioutho, emezha, ha me ho lezo da vervel
en anken. Guelloc'h o deus kavet doueou faoz eget-
hon-me. Mad ; me'lakai anezho da zoubia dindan
galloud an idolatred. An tan euz va c'holer a rosto
an douar gat kement munu-mad a zo ennhä hag a
ielo bete goeled ar menezioù. Va holl birou a laos-
kin varnho. Digass a rin varnho ar gernez. Kass a
rin laboussed d'ho dispen a daolioù beg, loened
gouez d'ho drailla, ha sarpansted d'ho flemma. En
dianveaz, lazerez ; en diabarz, enkrez. E pe leac'h,
emaint-hi, a livirin neuze ? Ra vezo tennet ho hano
euz a douez an dud. Pobl diskiant ! Ma karfec'h
lakaat evez mad ha goulenn ennoc'h o c'hunan perak
eur zoudard a bil mil soudard, perak daou a bil dek

mil, e ouessec'h eo Doue en deus ho roet, ho kuerzet d'oc'h enebourien. Ia, d'in-me va zro, d'in-me ar venjans, d'in-me an dismantr ! Emañ an heur e vont da skei.

« Evel-se, Doue a varno he bobl. Sellet a rei a druez gouskoude ouz he zervicherien goal gasset, skuiz, eat da netra. »

« E pe leac'h emaint eta, a lavaro neuze an Aotrou, an doueou o poa roet dezho ho fizians, a zreb druzoni oc'h anevaled hag a ev ar guin a ginniguit var ho aoteriou ? Galvit anezho eta d'ho sikour ! Ra zeuint d'ho tioual a enep an taoliou fall a zo skoet varnoc'h. Anzavit eta n'eus ken Doue nemet hon-me. Me eo a ro ar vuez hag ar maro : me a sko hag a bare ha n'eus ket unan hag a elfe tenna an den euz a dre va daouarn. Me ebken, en eur zével va breac'h etrezek an env, a c'hell lavaret : Me a vev e peb amzer ! Ha c'hui ive, tud euz a bep bro, dougit respet da bobl Jehovah. Rak Jehovah a venjo goad he zervichourien ; kastiza'rei ar re a ra drouk dezha, ha karga'rei a vennoz an douar hen deus roet dezha. »

Pa oue perachuet ar c'hantik, Moizes a lavaras d'ar bobl : « C'huac'h-ugent vloaz a meus, ne ellan ket mui kerzet e penn ar bobl. Ouspen, an Aotrou en deus lavaret d'in ne dreuzin ket ar Jourden. Jehovah he unan a vleino ac'hanoc'h hag a ziskaro oc'h enebourien. Bezit kalounek ha ne gemerit ket aoun rak ho armeou. Hervez urz Doue, Josue a gemero va flass er penn araok : « O va map, a lavar neuze en eur drei varzu Josue, bezit bepred stard ha dispount. Kass a reoc'h an daouzek tribu d'an douar promettet, hag he ranna a reoc'h

etrezo. N'o pezet neb aoun ; Doue a zo ganeoc'h. »

Mignoun an Aotrou Doue a dremenas neuze dirak peb tribu evit rei dezho he vennoz evel eun testamant euz he garantez. Goude beza digasset da zont dezho holl euz ar bennoziou en doa skuillet varnho ar patriarch Jacob, e troas he zaoulagad etrezek an env hag e lavaras a bouez-penn ar c'homzou dudiuz-ma : « Israel, n'eus ket eun doue all hag a ve henvel ouz hon Doue-ni ! Euruz ar bobl a ell goaskedi dindan diouaskel Jehovah. Hen eo ar skoed a zifenn hag ar c'hleze a ro ar viktorel. O c'henebourien a rei d'eoc'h brezel ; mez c'hui o lakai da zoubla dindan ho treid ho fenn ourgouilluz. »

Ar re-ze oue komzou diveza Moizes gat an dud. Var urz an Aotrou, e kimmiadas diouz ar bobl hag e pignas var menez Nebo. Eno e tlie repoz an hini en doa delivret Israel. Nebeud amzer araok en devoa great ar beden-ma da Zoue : « Aotrou, Doue holl-galloudek, roit konje d'ho keaz servicher da vont en tu-all d'ar Jourden, evit guelet gat va daoulagad ar menezioù benniget hag an douar promettet. Hogen, Doue en doa lavaret dezha : « Ne dreuzoc'h ket ar Jourden ; mez guelet o reoc'h an douar-ze divar gorre Phasga. « Pa oue diouezet an deiz merket gat Doue, Doue a gassas he zervicher var menez Nebo, var beg Abarim a zo a zioud menez Phasga. Ac'hano e tiskuezas dezha holl bro Galaad bete Dan, douarou Nephtali, Ephraïm ha Manasse, bro Juda beteg ar mor tu ar c'huz-heol, hag holl vro ar c'hresteiz adalek meziou Jericho, kear ar palmez, bete Segor. Epad m'edo lagad Moizes a para var ar vro nevez-se, Jehovah a lavaras dezha : « Setu a-ze an douar a meus touet rei da vugale

Abraham, Isaac ha Jacob. He guelel a rit, mez ne deoc'h ket ennhl »

Ar profed braz a zoublas dindan dorn an holl-Galloudek. Daoust ma zoa c'hoas iac'h ha kreñv en despet d'he c'huec'h ugent vloaz e varvas en deiz-se var menez Nebo, ne ket abalamour m'oa dinerzet, mez abalamour ma' zoa urz an Aotrou. Jehovah a zigassas eun eal d'he zebelia e traoñien Moab, ha morse n'eus gellet gouzout e pe leac'h oa bet lakeat he gorv. Epad tregont dervez, Israel a reas kaon d'an hini hen devoa hen delivret, a ioa bet he brofed, en doa roet dezha lezennou ha skrivet he istor. Moizes eo burzudussa den azo bet var an douar araok ma tiskennas an Hini ne oa nemed ar skeuden anezha. Morse, var an douar, ne vezo ankounac'heat servicher leal an Aotrou Doue. « Karet gat Doue ha gat an dud he hano a vëzo benniget da-viken »



TAOLEN.

	PAJEN.
I. Eur c'havel var ster an Nil	5
II. Pastor Madian	10
III. Goalinier Doue var an Ejipt	16
IV. Kenavo	20
V. Menez Sinaï	27
VI. Klemmou ha grosmol	37
VII. Ar profed Balaam	46
VIII. Maro Moizes	55





Imprimerie N.-D. des Prés. — Ern. DUQUAT, directeur.
Neuville-sous-Montreuil. (Pas-de-Calais.)